

Breizh Brevez

CAILEAN T. MAC COINNICH

“AR GRABAN”

troet diwar ar gouezeleg

BRO-GEMBRE : AR PEVARE CHADENN

“Un chien dans un jeu de quilles”

diwar-goust ar Vretoned

N° 61 - 1983

BRUD NEVEZ

Kelaouenn vrezoneg mizieg.

Niverenn 61
Miz genver 1983.

Rener: **Andreo Merser.**
Sekretour: **Jakez Salaun.**

An oll lizerou ha skridou a zo da veza kaset da Brud Nevez, 6, ru Beaumarchais, 29200 Brest.

Priz an niverenn-mañ: 10 lur.

Koumanant-bloaz:

- priz ordinal: 70 lur.
- koumanant-skoazell: azaleg 80 lur.
- studierien: 50 lur.
- broiyou estrañjour: 100 lur.

Eur houmanant a dalvez evid 10 niverenn.

Ar chekennou-bank a zo da veza kaset war-eeun da: Brud nevez, 6, ru Beaumarchais, 29200, Brest.

Ar chekennou-post a zo da veza lakaet war K.R.P.: « Brud Nevez » 893-94 P Roazon.

Ar houmananchou evid ar broiyou estrañjour a zo da veza kaset, e arhant peb bro. da: Dawson-France, B.P. 40, 91121 Palaiseau Cedex France.

I.S.S.N.: 0399-7014.

Disklêriet hervez al lezenn: kenta trimiziad 1983.

C.P.P.A.P.: 34 627.

Ar merour: P.M. Mevel.

Moulet ez-prevez gand Brud Nevez.

C. evid an oll bennadou.

N'eus ket a aotre da adembann eur pennad diwar Brud Nevez heb beza bet an aotre d'henn ober.

Ar skridou hag ar pennadou a vez embannet e Brud Nevez n'emaint ket da veza lakaet war gont ar gelaouenn heh-unan, war gont ar re o-deus skrivet anezo hebken.

Ar skridou ne vint ket embannet a vo kaset endro ma vez tu.

Embannet e vez BRUD NEVEZ gand skoazell EMGLEO BREIZ.

Taolenn

Naig Rozmor: Ar skouled.....	3
Loeiz Roparz: Kan ha diskan gwechall.....	7
Cailean T. Mac Coinnich: Ar graban.....	10
Dewi Jones: Ar pevare chadenn e Bro-Gembre...17	
Kelenn brezoneg war an dachenn.....	22
J. Le Dù: Rann Geltieg Vrest.....	23
A. Keravel: Ragtres ar Rektor Rollin.....	27
A.V. Chapalain: Diwan: eun dibab etre daou zoare.....	29
Galvadenn ar Gelennerien Vrezoneg.....	35
P.M. Mevel: Rentaou-kont.....	37
Lizerou.....	40
Keleier ar miz: euz an eil devez d'egile.....	43
A. Keravel: Diskouezadeg etrevroadel ar yezou..47	
F.B.: « Un chien dans un jeu de quilles ».....	50

Ar skouled

War-zao tud Lambao! War-zao tud Rosko! Harz ar skouled!
Emaint deuet endro, da heul an hañv, skouled ar hêriou braz
Gand o daoulagad lemm, o bizied krog hag o begou mel.
Staget int adarre da furchal or mêziou, or chapeliou
Ha beteg or beredou.

Peb tra ' zo mad dezo da brena e stok-marhad,
Pa n'hellont ket o laerez,
Ha n'eo ket hepken kroaziou hag arrebeuri sakr on ilizou,
Med ive ar gwele kloz gand e garavellig koant hag e biñsin dour
benniget,

An orolach, ar pres, ar bank,
Med c'hoaz tokou boulouzet on hentadou, chall mamm-goz, he
hoef hag he japeled,
An trebez, ar pod-houarn, hag ar vaz-yod hag ar Werhez a-zioh
an nor.

Dond a reont, pa vez teñval an noz, da gerhad or zent ar santella,
Taolet dizamant bern-war-vern en o hirri,
En o zouez eun aotrou Krist o ouela daelou mên
Pa'z eo diframmet eur wech all digand e vamm.

Daoust hag e rankim farda endro fuzuliu ar chouanted
Da ziwall noz-deiz doriou or chapeliou?

Da ziwall teñzoriou or bro
A-raog na vezo sunet gand ar skouled
Beteg mel he eskern?

Kilit preizerien villiget!
Bremañ n'eo ket an archerien a gavoh d'ho tigemer,
Med ar Vretoned o-unan,
Ha mein a-walh a jomo ganeom
Da lemna or hontilli.

Tremenvan

Ema ar bloaz oh ober e dalarou.
An diskar-deliou muntre a zo distroet war e giz
Da gontella ar vleunienn ankounac'hêt.
Setu ar miziou du gand o zamm huzil
Oh astenn teñvalijenn war ar bêd.
An natur glaharet a zigemer mud an deiz ken berr hag eun taol
lagad,

Berr evid digas deom da zoñj e vezo heñvel or buhez,
Heñvel pe wasoh pegwir an nevez-amzer
A deuzo an daelou skornet war ar mantellou kañv.

Karantez! O karantez!

Ped kwech em-eus kanet ahanout?
Ha ped kwech koulskoude eo bet bloñset va halon ganez?
Ped kwech on bet trubardet gand da gomzou flour?
Beteg en em houlenn pe ' oas ar vleunienn zispar a ganen
Pe eur meleziour faoz!

Peurliesia an neb a lavar ho karoud
Ne ra nemed en em garoud e-unan dreizoh.
Ezomm e-neus euz meleziour ho taoulagad
Da zistrei dezañ eur skeudenn vraoet euz e bersonelez gwirion.
Paouezit da ficha, da glinka ar skeudenn-ze
Hag e yelo buan ho karantez e tanoachou.

Ar memestra eo evid ar vignoniaj.
« Na dousa tra eur mignon gwirion! » eme ar hrennlavar,
Feiz ya! Med peleh ema an teñzor-ze?

Eur mignon gwirion a rank beza laouen bepred
Ha goude ma vije e galon o tiwada;
Red eo dezañ ouspenn gouzoud selaou ha konforti,
Gouzoud plega, rei, sikour, meuli ha fougeal
Ha gouzañv sioul e blanedenn.

Piou ' zo prest da veza va mignon? Den na respont?

N'eus forz! Hervez al lezenn beurbaduz,
 Eh ouzon eo bet fardet va halon en he zempladurez
 Evid ar garantez.
 Marteze e vezin kignet beo ganti pegwir e ranker atao paea,
 Evelato gwelloc'h eo ganen mervel diwar he houst
 Eged beva hebti.

O karantez! O va heol!
 Kousto pe gousto e vezi va magadurez pemdezieg
 Ha goude ma ne gavfen da ranna
 Nemed karantez zous, feal ha gwirion va hi.

Naig Rozmor.

da lenn ha da adlenn

NAIG ROZMOR

Karantez ha karantez

barzonegou

18 lur (150g)

Kan ha Diskan gwechall

N'eus ket gwall bell e kreiz Kerne'hee 'n dro ar Han ha Dis-
 -kan, Pe-a-dra da zidual an dud deuz ar goañv 'vel deuz an
 hañv. Deuz ar mintin abred war zao leuskem ar vouez da va-
 -le 'Vel al lapoused lein ar gwez o saludi an de.

N'eus ket gwall-bell e Kreiz-Kerne 'hee 'ndro ar Han ha Diskan,
 Peadra da zidual an dud deuz ar goañv 'vel deuz an hañv.
 Deuz ar mintin abred war-zao leuskem ar vouez da vale
 'Vel al lapoused lein ar gwez o saludi an de.

'Ser ober tammou labouriou 'tre an ti hag ar haridi
 E vouskanem eun tammig son 'ser kempenn ar benviji.
 'Tond deuz ar park d'an abardè 'tremen 'biou an tier
 'N eur gano c'hoaz larem noz vad da vignoned ar hartier.
 Pa zigoueze deom mond g'an treñ war-zu gar Montroulez,
 War gan larem keno d'ar vro keno d'on tudigou kèz.
 Pegen yahuz, yaouankizou, goud bevi 'n eur gano!
 Chañs vad deoh d'ober kemend-all 'n eur vired giz vad ho pro.

Ton ha son savet evel gwechall gand **Loeiz Roparz.**

Pedenn ar haner d'ar butuner

Gwelloh eo ar moged butun da skiminal an ti
 Diwar dan an oaled ' tivogedi
 'Vid n'eo da hourlañchenn mab-den o virvi
 Diwar eun abadenn ganin.
 Deuz taol eta, mar plij, chomit heb butuni
 Pe it er-méz d'aveli ho penn
 Gand ho korn pe ho sigaretenn
 Pe c'hoaz d'azeza er hogn dirag eur hlaouenn
 Da gas d'an neh ho mogedenn.
 Mil bennoz deoh neuze a-bouez-penn.
 Gand meur a ganaouenn laouen.
 Mil bennoz deoh neuze a-bouez-penn.
 Gand meur a ganaouenn laouen.

♩ = 60

Gwelloh eo ar moged butun da skiminal an
 ti Diwar dan an oaled' tivogedi' Vid n'eo da hour-
 -lancheñn mab den o virvi Diwar eun abadenn gani-
 -ri. Deuz taol eta mar plij, chomit heb butuni
 Pe it er maez d'aveli ho penn Gand ho korn
 pe ho sigaretenn Pe c'hoaz d'azèo er
 hogn dirag eur hlaouenn Da gas d'an neh ho moge-
 -denn. Mil bennoz deoh neuze a bouez
 penn Gand meur a ganaouenn laouen! Mil bennoz -en.

Ar graban

Eur gerig en a-raog

Ema Mikael Madeg da vad o trei danevellou gouezeleg euz Bro-Skos e brezoneg, peadra d'ober danvez eul leor a rankfe beza prest er bloaz a zeu. Da hedall setu eun tañva euz eun danevell kenta atese.

Skrivagner an danevell-mañ, Cailean T. Mac Coinnich, eo unan euz ar re founnusa toud o fluenn e gouezeleg. Pasteur protestant eo dre e vicher hag o veva war e retred ema e inizi Kornog pella Gouzelva Bro-Skos.

An danevell-mañ, An Spuir, a vo kavet e levr danevellou ar skrivagner-mañ Oirthir Thim, embannet gand Gairm, Glaschu, 1969.

Meur a vloavez hir a zo abaoe ma 'm-eus klevet an istor-mañ pa oan bihan war varlenn va mamm, ha ken pell hag e vin sikouret gand va memor e plijfe din he honta dres evel ma 'm-oa klevet anezi.

Mikael a oa o labourad war an touriou-tan abaoe ma oa deuet d'an oad da hounid e vara. Eur pennad e oa bet en oll anezo, zoken touriou-tan ar herreg ar muia digenvez a zo er Hornog. Padal, evid lavaroud ar wirionez, n'e-noa mall ebed pa lavaras beza prest da vond da dour-tan Fallgarreg, hag e komprenas ne vefe asamblez gantañ nemed eun den all d'e harpa war ar garreg, e-pad ar zizunvez kenta. Anaoud a ree an istoriou souezuz a vez kontet diwar-benn kalz euz touriou-tan ar herreg, med eun den solud en e benn e oa ha morse n'en-doa greet van ebed diouto. En desped da ze, diwar ar munut ma lakeas, eñ hag e genlabourer, Jorj Kerwerhez, o zreid war aod Fallgerreg, e-noa disfiziañs ne vefe ket an traou evel ma oa sañset dezo beza.

Kas a rejont an tammig arrebeuri oa deuet ganto d'an neh en tour-tan, ha sevel war ar riboul-dro da zelled ouz ar vag he-doa o degaset, o vond diwar wel. Sklêr dezo edont trohet kuit diouz darempred an dud ken na zistrofe-hi gand an trede den a-benn eiz dervez.

A-raog d'an nozvez kenta mond e-biou, e weljont e oa direnket ar skingaserez radio, ha dezo ober o seiz gwella, ne zeuas ket homañ endro war he zu. Dre chañs ne hoarvezas netra ebed a-dreuz d'ober dezo rankoud kas kelou d'ar béd diavêz buan ha buan.

Ne chomas ket an traou evel-se pelloh eged an eil abardaevez, avad. Edo Mikael o teurel eur zell tro-war-dro kambr al lampeier a-raog diskenn gand e goan; er-mêz, war ar garreg, edo Jorj, azezet war eur rohell o pesketa, rag eun abardaevez sioul a oa, hag evid doare ne oa ket diouer a besked tro-dro d'ar Fallgarreg. Eur strobard mad a hwintiged gwenn hag a voru a oa en e gichenn war ar roh, daoust n'oa ket bet er-mêz eun eurvez c'hoaz.

Erfin, Mikael a oa e hanter-hent an deleziou etrezeg ar zal-veva pa glevas ar garm, eur garm a skoas trumm e ziousskouarn, ken spon-tuz ma oe darbet dezañ pilad war e benn en diri. Diskenn a reas d'an daoulamm, sortial dre an nor diavêz ha trei war an dachennig etre traoñ an tour-tan hag aod ar garreg. Selled a reas aketuz war ar garreg e leh ma 'n-oa gwelet e gamalad da ziweza, e kenkaz e vefe kouezet war ar hae.

Tost serr-noz e oa anezi, ha war-lerh dond 'mêz euz kambr al lamp braz n'oa ket e zaoulagad ken mad outañ, med war-lerh eur pennadig e welas Jorj war e barlochau e-touez ar reier, oh en em ruza da gaoud an dachenn. Hasta a reas d'e gaoud en eul lamm, hag e zikour da zevel war e dreid.

«En ano Doue, petra 'zo c'hoarvezet?» a houlennas Mikael, hag a helle gweled neuze e oa fas egile gwenn evel eul liñsel, hag e oa gwad o poulladi war e zorn dehou. Korv Jorj a grene outañ, hag e kemere harp ponner war zivreh ar paotr all.

«Eun aneval», emezañ, «reunig, pe reunig-skouarneg. Lammet e-neus diouz ar mor hag e-neus taget ahanon. Sikour ahanon da vond e-barz, ha serr an nor.»

Ne lavaras Mikael ger all ebed a-raog dezo erruoud er zal-veva.

Dougen a reas e gamalad beteg ar gador genta a oa war-dro, ha rei eur werennad kognag dezañ. Prienti a reas eur pladad dour, eur podadig louzou para hag eur pakad lienaj, ha komañs da nêtaad an dorn gloazet. Pa stagas an traou e taolas eur zell trumm ouz fas egile.

«Eur reunig, pe eur reunig-skouarneg?» emezañ. «Morse n'em-eus klevet ano e klaskfe ar re-ze afer ouz an dud heb abeg. Kentoh ez eus gand an dorn-mañ tres da veza bet skilfet gand ivinou pe digoret gand dent; ha koulskoude ne anavezan ket dent a rafe kemend-all.»

Jorj ne lavaras grik. «Ale, ale, paotr paour», eme Vikael, « en da wele ema da blas. Me chomo war-hed emberr evidout-te. Ne vi ket falloh war-lerh eur pennad diskuiza didrouz.» N'oa ket tamm ebed dineh o weled tres fall e gamalad. Ha kerkent hag astennet Jorj en e wele, ma en em roas da gousked e-giz eur mên, ha Mikael a lezas anezañ d'henn ober.

«Spi em-eus n'ez eus ampoezon ebed en dorn-hont», emezañ outañ e-unan. «Petra an diaoul a rin-me heb doare ebed da gas kelou da zen.»

Med kas a reas ar menozioù diwar dro e spered ha komañs da rei evez da labour an tour-tan. Pignad a reas da gambr al lampeier, ha mond er-mêz war ar riboul-tro, studia a reas an avel ha selled ouz ar stered hag ehonder teñval ar meurvor e leh n'oa ano ebed euz gouleier an disterra batimant war an dremmwel. Prest e oa da vond d'an traon, pa zavas diwar ar garreg izelloh ar garm spontuz e-noa klevet dija. An dro-mañ e kendalhas ar reuz. Komañs a reas ar hlemm hag ar hri euzusa dezañ da gleved biskoaz, ken e soñjas dezañ e oa oll anevaled gouez an donvor oh en em ganna war reier ar Fallgarreg.

Diskenn a reas derez war-lerh derez ken buan ha ma hellas. Selled ouz Jorj en eur vond d'an traon med kousket e oa eñ atao, da vihana eur seurt kousk diêz, direpoz. Pa dizas Mikael an nor vraz e welas edo homañ o krena war he mudurunou evel ma vefe eun nerz dreist-natur o poueza war he diavêz. «Aotrou Doue, ho-pezit truez», emezañ, «n'eo nag eur reunig, nag eur reunig-skouarneg, na tra ebed euz an douar a anavezan-me hag a zo er-mêz.»

Eur zell all a reas ouz prenn an nor, hag an diou varrenn zir a zalhe anezi serret, hag heja e benn. Tenna a reas diwar e grehenn ar chapel e-noa hag e lakaad a-istribill assemblez gand ar groaz arhant bihan a oa stag outañ, war alhwez braz an nor. Kerkent e chomas a-zav an nerz a heurte ar framm, med n'ez eas ket diwar-dro ar spont a oa er-mêz. Dalhmad e tregerne ar yudadennou euzuz, ha goloet oa gand eur hwezenn yen dre ma pigne endro an diri.

N'oa ket gweloh ar pez a hede anezañ pa en em gavas er zal-veva. War al leur anezi edo Jorj, o ruza war e barlochou evel eun aneval, anad warnañ e oa o vond da ziskenn da gaoud an nor diavêz. Eur sklêrijenn dinatur a oa en e zaoulagad, ha pa astennas Mikael e zorn da zikour anezañ da vond war e zeulioù, e troas etrezeg ennañ gand e zent dizolo evel eur hi klañv. Egile a gomprenas en eun tanflamm ne dalveze da netra argui.

Astenn a reas adarre e zorn kleiz evel da dapoud krog ennañ, ha pa en em daolas Jorj d'e zanta e skoas e zorn dehou gantañ war doull e skouarn. N'oa ket ar wech kenta d'an dorn-ze beza o hoari, ha Jorj a gouezas dilavar ha difiñv war al leur. Mikael a zachas anezañ beteg eun azezen hir ha striz harp ouz ar voger ha kerkent hag e astennet warni, e stagas e zivesker aketuz gand e houriz e-unan. Kemer a reas eur rollad kordenn, hag ober eun dro pe ziou ganti d'e staga ouz an azezen.

An dra genta a deuas d'e spered a oe laha ar goulou braz. E-kenkaz e welfe eur vatimant bennag n'oa goulou ebed ken diouz ar Fallgarreg, hag e kasfe kelou da ofis kreiz an touriou-tan. Med, neuze, e soñjas e hellfe kement-mañ kas batimantou diwar o hent, en arvar da zegas brasoh koll. Petra oa yehed, ha zoken buhez daou zen e-keñver hini kalz tud.

Med n'oa ket Mikael ar mod den da chom plantet gand e zaoarn kroaziet. War e hiz da gambr al lampeier e pignas. Ha mired ouz an hini braz da vond endro, ha komañs da gas kelou en eur implijoud yez ar gouleier pa vez dañjer. E-pad an nozvez hoañv hir-ze e kasas ar helou d'ar seiz avel, med na sked goulou na trouz kornboud eur vatimant ne respontas anezañ diouz teñvalijenn an noz. Jorj ne fiñvas na ne zihunas en oll, hag a-benn ar fin e teuas sklêrijenn venniget ar mintin. Mikael e-noa lakaet ar radio da vond endro e-pad an noz, rag en desped d'ar skingaserez beza nulet, an ardivink reseo a zee mad hag a zegemere kement tra a veze skingaset diouz

ar béd diavêz.

Dihuni a reas e gamalad, ha kerkent ha ma tigoras hemañ e zaoulagad, e komprenas Mikael e oa echu follentez an noz. «Eun tammig direnket e oas en noz-mañ, ha red eo bet din da huala, paotr paour», eme Mikael. «Penaoz eo da zorn?»

«N'eus ken poan toud anezañ, med gwasoh e hellfe beza», a respontas egile, ha peoh goude-ze tra m'edo ar paotr all o tistaga anezañ. An dorn gloazet a oe nêtaet, louzaouet a-nevez, ha lienet aketuz adarre. Eun tamm boued a yeas ganto, ha poent al labour deiz a oa. Mikael a oa skuiz eun tamm bennag, ha Jorj didrouz a-walh, kemeret e spered gand e labour.

Da vare serr-norz e komañsas Jorj en em zantoud diêz. N'oa ket an tres warnañ, na feson e zaoulagad evid plijoud d'e gamalad, hag e tivizas beza war evez abred en dro-mañ. Pa oa oh aozo boued an abardaevéz e roas eur werennad all a gognag da Jorj, war-lerh skuilla louzeier kousked e-barz. Kerkent hag e teuas c'hoant kousked da Jorj, e sikouras anezañ da vond d'e wele, ha pa oe morvitellet, e stagas aketuz ouz ar gwele evel ma 'n-oa greet dija.

A-veh dezañ echui al labour displijuz-mañ ma krogas adarre ar reuz hag ar spont er-mêz. Ne zigoras ket an nor vraz ken diwar-ze. N'e-noa c'hoant ebed da vond er-mêz war aod ar Garreg, ha forz penaoz e oa sur ne gavje na ne welfe netra ebed eno. Ouspenn-ze, divizet 'n-oa ne zigorfe ket an nor ahann na deufe ar vag-sikour.

Sevel a reas adarre da greh an tour-tan ha komañs kas kelou da houlenn sikour, tra ma lakae beli war e spered da glask kompren an degouez divalo e leh ma 'n em gave paket. Daoust hag ar Garreg he-unan a oa kaoz? Ha petra zinifie he ano, end-eün? Ar Fallgarreg? Karreg haro, gouez, pe Karreg an traou fall? Pe neuze eo Jorj a oa penn-kaoz d'an traou-ze? Eun dra bennag fall e-nije greet hag e vije eun dial dinatur war e lerh? Daoust hag e vefe gantañ eun dra n'e-noa ket da veza? Ar zoñj diweza a skoas e spered ha dizale e tiskennas d'ar zal-veva e leh ma oa malizennig vartolod ar paotr all dindan an daol-skriva.

Kement ha mond e sellas ouz an den a oa kousket. Ken morvitellet all e oa atao hag edo Mikael war-nes mond kuit diouz ar gambr pa gouezas e zell war ar bibl e-noa lezet digor war vruched e gamalad

a-raog sevel. Tre e-kreiz ar follenn e oa deuet ar paper d'ober stumm eur pao. Eur skrij a yeas dre e gorv: «Jorj, va faotr», emezañ outañ e-unan, «pe 'z eus relijion ganez pe n'eus ket, geriou ar Wirionez o-deus gwaskedet ahanout emberr diouz ar peza a zo war da lerh.»

Tapoud a reas eun duilladig alhweziou a oa e godell an den kousket. Digeri a reas e gased ha komañs goullonderi anezañ. Tammou dillad, daou pe dri levr, eur pakad liziri ha traouajou seurt-se. Med e traoñ ar hased e tegouezas gand eur pakad lien bihan, ha kerkent ha dispaket hemañ e ouezas e-noa lakaet e zorn war benn-abeg an afer. Dastumet eno e oa pao eun aneval, troad eun tigr pe eul leopard n'oa ket evid lavared, med n'eus forz penaoz kraban unan euz gouenn ar hizier braz-se, sur. Alaouret e oa ha kinklet brao-tre gand aour, arhant ha mein prisiuz. A-veh dezañ steki outi gand e zorn, ma klevas ar yuderez er-mêz o kreñvaad spontuz. N'oa ket ezomm klask pelloh. «Prisiuz pe get, ne chomi ket dindan ar memez toenn ha me», emezañ outañ e-unan, hag heb dalea ken e strinkas anezi dre brenestr uhella an tour-tan. Kerkent e tavas ar spont, peoh didrouz a oe war ar Garreg, eun drugar.

Tro eun hanter eurvez war-lerh e klevas Mikael war ar radio ar geriou flourra dezañ da gleved biskoaz... «Ar vatimant petrolier „Lucrèce“ 'deus roet da houzoud ez eus eun dra bennag a-dreuz gand goulou ar Fallgarreg. Ema ar vag-sikour en hent, e-kenkaz e vefe bet eur gwall zegouez bennag war ar Garreg...»

Edo goulou an deiz o paouez dond pa erruas ar vag. Eur medisin a zeuas diwarni, asamblez gand lod euz ar vartoloded, ha kerkent ha ma welas dorn Jorj e houlennas: «Penaoz an diaoul eo en em gavet an dra-ze?» Jorj ne lavaras grik, daoust dezañ beza dihunet mad, ha deuet endro dezañ e spered hag e skiant-vad. «Feiz», eme Mikael, «paket 'n-eus eur zilienn-vor braz digustum war ar hae. Lakaet e-neus e zorn en he beg da denna kuit an higenn, ha setu petra n-eus bet ganti.»

«Gwelom ar pesk», eme ar medisin.

«Taolet 'm-eus anezañ endro er mor», a respontas Mikael, hag ar medisin a skrabas e benn.

«Kerkoulz eo din kas kelou», emezañ a-benn ar fin, «an dorn-mañ a rank beza entetet outañ gand eur medisin, ha soñjal a ra din eo

furroh dit lezel ar Garreg evid eur pennadig. Eur gwall bennad emadout o paouez beva.» Eur goulenn dilavar a oa el lagad lemm a oa war fas Mikael.

Eur strollad nevez a oe lakaet war ar Garreg neuze. Meur a zevez a zeas e-biou kent na oe pareet dorn Jorj, med kerkent ha deuet e nerz dezañ endro, e klevas Mikael gantañ istor ar pao. Evid doare, bet oa Jorj o verdei a-raog kregi da labourad war an touriou-tan. Hag eur wech m'edo e vatimant o karga gwez war aod Kornog Afrika, e-noa laeret ar pao en eun templ bihan e-noa kavet dre zegouez e-kreiz eur hoad. Hag en desped da aliou kontrol e gamaladed e kasas anezañ gantañ e-pad meur a vloavez: « n'em-oa bet trubuil ebed gantañ a-raog», emezañ erfin, «med Doue ra vezo meulet e oa asamblez ganen eun den fur hag a skiant vad pa deuas an afer da benn.»

Jorj ne zistroas ket d'e labour war an touriou-tan, hag en tu all euz tri pe bevar gamalad tost, ne gontas morse Mikael doare ar pez a oa en em gavet. Tremen a reas meur ha meur a nozvez war ar Garreg goude-ze, ha ne oa na gweloh na falloh eged ar herreg all. Med meur a zizunvez hag a vizvez war-lerh, e tihunas diwar eun hurlink spontuz, e ziouskouarn o tasseni atao en eur mod gand garm diou nozvez hoañv hir war dour-tan digenvez ar Fallgarreg.

Cailean T. Mac Coinnich.

Troet diwar ar gouezeleg gand **Mikael Madeg.**

dial: *veñjañs (ger kembraeg).*

Bleun-Brug

Dilun, dimeurz, dimerher...

Rimadellou nevez evid ar vugale

20 lur (200g)



Ar pevare chadenn e Bro-Gembre: Red e oa beza o selled...

Ya, red e oa beza o selled, d'al lun, d'ar meur, d'ar merher, ha... bemdeiz, eur wech ma oa krog ar chadenn gembraeg nevez, d'ar henta a viz du.

Kroget e oa bet da gomz euz eur chadenn gembraeg ouspenn 20 vloaz 'zo. Ha pa oa bet krouet **Cymdeithas yr Iaith** (eur strollad da stourm evid ar yez), e-kreiz ar bloaveziou 60, e oa deuet ar chadenn gembraeg da veza unan euz paliou ar gevredigez: hervez tud 'zo, e oa ze dañjeruz, peogwir e hellfe eur pal ken uhel ha ken diêz da dizoud, trei a-eneb d'ar Gevredigez, 'benn ar fin, ma teufe da hwita...

Ha neuze, goude kement a vloaveziou – kement hag ouspenn a zo bet tremenet en toull-bah gand ar re o-deus stourmet evid he haoud – eo' deuet ar chadenn. Kalz a vruderez a oa bet greet en a-raog eviti, war chadennoù all an tele, war ar hazetennoù, ha dre embann lennegezh, paperou, hag all... Setu pa oa prest ar chadenn da skigna heh abadennoù, e oa kalz a dud prest da zelled deuz ar re a vefe kinniget.

Tabut a zo bet, memestra, a-hed ar bloaveziou, etre ar re a oa eneb ar hembraeg, hag ar re a felle dezo klevet muioh a gembraeg war ar chadennoù hag a oa anezo dija – ha kement-mañ evid ma vefe gwelet ha klevet kembraeg ivez gand ar famillou di-gembraeg. An den brudeta da zivenn ar zoñj-mañ a oe **Jac L. Williams**, marvet pemp bloaz 'zo bremañ. Med a-benn ar fin, e veze sellet deuz afer ar chadenn gembraeg evel deuz eun afer a « b/principe ». Hag e gwirionez,

e oa ar peb brasa deuz kembraegerien an emzao da nebeuta evid ar chadenn. Med eviti e oa ivez ar re ne blijje ket dezo ar hembraeg. peogwir e vefe « dieubet » ar chadennou all (**BBC Wales-Cymru** hag **ITV Harlech**) deuz ar hembraeg gand ar chadenn nevez.

Nahet e oa bet ar chadenn gembraeg adarre pa oa deuet en Itron Bleo-Melen e 1979 e penn gouarnamant Londrez. Kerkent e oa bet c'hoaz eur bem tud prest da nah pêa taillou an tele. Hag ouspennze, e oa prest **Gwynvor Evans**, Prezidant **Plaid Cymru** d'ar mare-ze, da gomañs ober eun harz-debri betek ar maro, evid divenn ar « princepe », d'ar 6 a viz here. Eun nebeud deveziou a-raog fin miz gwengolo(d'ar 17 evid beza resiz) e plegas ar gouarnamant, hag ar chadenn gembraeg a oa bet prometet a-benn 1982 a zo deuet bremañ eta.

En gwirionez, n'eo ket eur chadenn gembraeg penn-da-benn 'giz ma oa bet stourmet gand **Cymdeithias yr Iaith** ha Gwynvor Evans da gaoud. Bez' e vez 22 eur a gembraeg ar zizun (ar bevrvasa anezo etre 19 eur ha 21 eur bemnoz, med diouz an abardaez ivez, bemdeiz, evid ar vugale, hag ouspenn c'hoaz, d'ar zul, hag all...). Stanket e vez an eurvezioù « goullou » gand an abadennoù gwella deuz chadenn 4 Bro-Zaoz. Med dre vraz, n'eo ket re ziskontant ar gembraegerien euz an doare-mañ, peogwir:

1) e vez gwelet abadennoù kembraeg da euriou deread: a-raog, e vevzent lakeet gwall-zivezad deuz an noz aliez. Ha kalz a vez a live uhel.

2) e vez laosket ar re a zo eneb ar hembraeg trankil en o horn, ha libr da zelled ouz eun abadenn bennag (e saozneg pe e kembraeg) hervez o c'hoant.

3) e vez dedennet eul lodenn euz an di-gembraegerien da zelled ouz ar chadenn nevez memestra, dra ma'z eus abadennoù a-zoare en kembraeg ivez. sporchou, d'ar zadorn da noz, dedennuz ivez evid di-gembraegerien.

Er memez amzer m'eo bet kroget chadenn 4 Kembre, eo bet adrenket eun tammig mad an eurvezioù kembraeg war ar radio, hag e vezont lakeet dreist-oll da veza skignet keit ha ma ne vez ket kembraeg war an tele. Dre vraz e vez abadennoù kembraeg a-hed ar zizun, heb ehan, adaleg 6 eur 25 betek 14 eur hanter, euz 17 eur da 18 hag euz 21 eur hanter betek 23 eur. Da lavared eo, on-nevez ouspenn

70 eurvez ar zizun, heb konta ar postou-radio lehel a hell beza ivez anezo, evel en Abertawe, Caerdydd, hag all...

Evel a heller soñjal, n'eo ket deuet ar chadenn gembraeg heb trouz a-eneb dezi. Trouz a zo bet, da skwer, peogwir he-doa kinniget ar gompagnunez **Redifusion** (hag a gas an tele dre bibellennou betek e ti ar zellerien en eul lodenn vraz deuz **Morgannwg Ganol**, a-uz da **Gaerdydd-Cardiff**) eur choaz d'ar zellerien etre chadenn 4 Kembre ha chadenn 4 Bro-Zaoz. Hini Vro-Zaoz o-doa choazet 80% euz an dud, dre ma oa bet lakeet kalz deuzouto da gredi ne vefe nemed kembraeg war chadenn 4 Kembre, hag ivez dre ma'z int evid ar peb brasa, gwall-digembraekeet n'eus forz penaoz. Neuze, evid eur wech, eo deuet ar gouarnamant da zivenn chadenn 4 Kembre en eur zisklêria e oa red rei anezi da weled d'an dud e-pad 6 miz, a-raog kas dezo goullennou all a-benn divizoud da vad.

Chadenn 4 Kembre (**S4C**, da lavared eo **Sianel Pedwar Cymru**) a zo en gwirionez eur « horv » hag a zo e karg deuz danvez an abadennoù digand **ITV Harlech** ha digand ar hompagnunezou bihan (hag eur bem a zo dija), ouspenn ar pez a vez aozet gand **BBC Cymru-Wales** hag ar pez a vez da gemer digand Chadenn 4 Bro-Zaoz evid an eurvezioù ma ne vez ket kembraeg.

Kavet e vez ivez bruderez a beb seurt war ar chadenn adarre, a-benn dastum arhant. E-keñver an arhant, roet zo bet 20 milion a luriou saoz evid ar bloavez kenta, betek fin miz meurzh 83. Roet e vo 24 milion all evid ar bloavez klok 83-84. En oll, e vo dispignet war-dro 40 milion a luriou saoz en eur bloavez da skigna 22 eurvez a dele beñ sizun.

Bremañ e hell ar peb brasa euz ar gembraegerien – war-dro 95% anezo – reseo chadenn 4 Kembre. Med eur gudenn eo bet memestra dond a-benn da lakaad an trañsemeteurien da veza prest e poent. Pa oa bet laret « ya » d'ar chadenn gembraeg e penn kenta 79, e oa 86 deuzouto e Bro-Gembre. Bremañ ez eus ouspenn 100. Med n'eo ket bet diskoulmet ar gudenn penn-da-benn c'hoaz, peogwir e chom broioù bihan ha ne hellont ket reseo ar chadenn nevez. En gwirionez, a-bouez braz eo e vefe gellet selled outi gand ar muia posubl a gembraegerien, peogwir e vo sellet piz, a-benn daou vloaz, ouz stad ar chadenn gand an **IBA (Independent Broadcasting Authority)**.

Sellom neuze ouz ar chifrou a zo bet embannet beteg-henn, da ziskouez penaoz e tro an avel ha penaoz e vez digemeret S4C:

An eil sizunvez:

Titl an abadenn	Doare	Devez	Sellerien
Pobol y cwm	eur serial sizunieg pobleg	da wener	124.000
Taro Tant	kana pobleg ha modern	da wener	121.000
Dechrau canu	kana kantikou		
Dechrau Canmol		da zul	112.000
Rhaglen Hywel	Mesk ha mesk		
Gwynfryn	gand H.G.	da zul	106.000
Gwydion	sizunieg « detektiv »	da zul	102.000
Yr awr Fawr	evid ar vugale, mesk ha mesk.	da zadorn	97.000

Setu an abadennou pobleka. Ar zizunvez kenta, e oa 12% o selled ouz S4C, hag en eil sizunvez, 10%. Ar chifrou evid chadenn 4 Bro-Zaoz a oa 6% ha 5%. Bez' ez eus teir chadenn all a zigemerer e Bro-Gembre: BBC Wales, ITV Harlech ha BBC2).

An trede zizunvez:

Pobol y Cwm		da wener	179.000
Gwydion		da zul	167.000
Dechrau canu,			
Dechrau Canmol		da zul	159.000
Rhaglen Hywel			
Gwynfryn		da zul	148.000
Newyddion Saith	keleier da 19 eur	da zul	129.000
Joni Jones	istor eur bugel pad ar brezel	da veurz	116.000

Resiz a-walh e vefe ar chifrou peogwir e vez implijet eur sistem gwall-nevez gand ITV e Breiz-Veur a-bez.

Eur hresk a zo bet neuze, hag e heller lavared eo abalamour:

- 1) eo gwelloc'h anavezet euriou an abadennou;
- 2) eo bet e-feduz ar vruderez;
- 3) int; dre vraz, abadennou a live uhel.

Ar brasa niver posubl a zellerien a zo 400.000: ne vez ket kontet ar vugale yaouank na kennebeud an dud a zo o chom er horn-broïou a zo heb tele kembraeg.

O-deus sellet ouz S4C 'pad 8 munutenn:

- ar zizunvez kenta : 52%
- an eil zizunvez: 46%
- an trede: 48,3%

Evid BBC-Wales, eo ar chifrou, dre vraz, 90%, hag evid BBC2, 63%.

Kontant a-walh int, tud S4C, gand ar chifrou-ze, hag en gwirionez, e vefont kontant, n'eus forz penaoz, ma vez 50%, pe muioc'h, deuz ar gembraegerien o selled ouz o chadenn 'pad 8 munutenn da nebeuta.

Peseurt pouez rei d'ar chadenn nevez? Esperoud a reer ez eo eun doare da rei gouiziegez, deskadurez ha plijadur d'ar zellerien, ha se dre abadennou a live uhel e-keñver danvez ha teknik. Med en eur ober kement-se, e tle beza ivez eun doare da binvidikaad Bro-Gembre e meur a zoare: da genta, da rei eur vuhez nevez d'or yez - danvez pinvidika ar zevenadur - peogwir ez eo an tele eur benveg ken kreñv e levezon war vuhez ha sevenadur an dud en deiz a hirio. Ma vo greet mad he labour gand ar chadenn, e hellfe lakaad muioc'h a dud da gavoud blaz d'ar hembraeg.

Kalz a ra ivez ar chadenn da rei labour d'ar hoarierien, teknisianed an tele, skrivagnerien, treserien, muzisianed, artizaned, hag all... hag e roio dezo an tu da beurwellaad o labour. A-hervez, e vefe war-dro 750 a bostou-labour evid an dud a zo o labourad e-barz uzinou, hag all... oh ober traou liammet gand ar chadenn.

Esperañs a zo ivez da gaoud muioc'h-mui a zarempredou war-eeun gand broïou all. S4C a gemer abadennou 'zo digand yezou all. Med a-bouez braz eo ivez kroui abadennou kembraeg a-orin, a live etrevroadel. Dija eo bet dibabet, dre Vreiz-Veur a-bez, **Joni Jones** (istor eur paotr bihan euz Hanternoz Bro-Gembre, e-pad ar brezel), da veza diskouezet en eur gouel filmou e Londrez. **Superhed**, eun abadenn « dessin animé » evid ar vugale, a zo bet gwerzet dija d'eun toullad broïou all.

Dewi M. Jones.

Kelenn brezoneg war an dachenn.

E niverenn 59 **Brud Nevez**, (hini miz du warlene), on-eus embannet tri bennad kenta diwar-benn kelennadurez ar brezoneg. Displega a ree M. ar Floc'h penaoz e oa deuet da gelenn brezoneg e kêr, en eur skol kenta derez. Diskouez a ree diouz e digand J. Goyat ne oa bet cheñchet netra er skolachou. Ha goulennet on-oa ivez digand sindikad an F.E.N. pehini oa e zantimant gwirion diwar-benn ar plan Savary.

N'on-oa ket bet e koulz avad an daou bennad all a oan e soñj da glokaad ganto ar studi deuz ar gudenn. Lennet e vint eta amañ pelloh.

En unan anezo, e tispleg ar helenner **Yann an Du**, peseurt kenteliou a vez roet ha peseurt enklaskou a vez renet e rann geltieg Skol-Veur Vrest. Gwelet e vo en e bennad e ra berz ar studiou keltieg e skol-veur Vrest, pa'z eus en oll ouspenn 300 studier o heuilla anezo er bloaz-mañ, ha ze, daoust ma vank postou-kelennerien hag enklaskerien.

Dindan stumm goulennou ha responchou a ginnigom an eil pennad diwar-benn ar skoliou **Diwan**. Ouz **Anna-Vari Chapalain**, sekretourez Diwan, on-eus greet ar goulennou. Fréz ha dibistig on-eus kavet gweloh ober anezo. Muioh a ze a evez a vo taolet ouz he responchou, emichañs. Trugarez dezi da veza bet asantet respont ahanom.

Eun notenn verr ouspenn: e departamant Penn-ar-Béd nemetken ez eus en oll tost da 200 000 a vugale euz 2 da 6 vloaz er skol.

A. Keravel en ano **Emgleo Breiz** a ra ar gont, deuz e du, euz an oll « nevezentiou » a zo war dachenn ar gelennadurez.

A-bouez e kavom a-hend-all moulla galvadenn **Ar Gelennerien Vrezoneg**, o houlen ma vije gwellaet – ha dreist-oll sevenet – ar plan Savary. Gwir eo, n'eo ket re abred evid prienti digor ar skoliou miz gwengolo da zond.

Brud Nevez

Rann geltieg Vrest: Kas war-raog ar studiou.

Stag eo ar studiou keltieg ouz Skol-Veur Vrest abaoe ar penn-kenta. D'ar houlz ma oan studier e Roazon, e komze **Per Trepos** din euz ar pez a oa da veza eur Skol-Veur goude beza bet eur skolaj (C.L.U.) e-pad eun nebeud bloaveziou. Per Trepos, kelenner war ar heltieg a zo bet unan euz an dud o-deus greet ar muia da zevel eur Skol-Veur e Breiz-Izel: eñ e-unan a oa euz Plozeved, hag eur brezoneger dispar. Deut e vije bet da veza dean kenta ar Skol-Veur goude beza bet rener ar skolaj ma na vije ket marvet trumm er bloavez 1966, d'an oad a 53 bloaz. War e lersh eo deut an Aotrou **Falc'hun** da veza kelenner e Brest, hag on deut da labourad gantañ e 1968. Daou om bet oh ober war-dro ar heltieg e-pad pell: bremañ om tri, prestig e vim pevar, ha n'eo ket labour a vank dim, peogwir e teu kelennerien all d'ober war-dro darn euz ar henteliou, koulz e Brest hag e Kemper.

200 studier er bloavez kenta...

Daou seurt studierien a zo: da genta, ar re o-deus c'hoant da zeski brezoneg ha n'ouzont koulz lavared ger ebed en eur erruoud; war greski eh a o niver, hag er bloaz-mañ emaint war-dro daou hant er bloavez kenta. En eil bloavez e hellont derhel gand ar studize, hag e kont ar brezoneg evid eul lodenn euz o arnodennou, forz peseurt studiou (istor, saozneg, etc...) a rafent.

En eil rumm e vez kavet ar re a oar brezoneg en eur zond d'ar Skol-Veur, desket er gêr, er skol pe memez o-unan. Ar re-ze a hell lakaad beteg c'hweh eur a vrezoneg en o implij-amzer er bloavez kenta: lennegezh, troidigeziou, istor ar yez, a hellont studia. En eil

bloavez ne reont nemed peder eur, dre n'eus DEUG ebed c'hoaz evid ar Heltieg: gwellaad ar brezoneg komzet ha skrivet, studia ar hultur, ar rannyezoù, an anioù leh, setu petra a vez kinniget dezo.

Evid ar bloaz on-eus eul lisañs war ar yezou, lennegez ha sevenadur Breiz hag ar broioù keltieg (Langues, littérature et civilisations bretonnes et celtiques). Eiz sertifikad (diou eur beb sizun a gentelioù evid pep hini) a ranker tremen da gaoud al lisañs; hervez reolenn Skol-Veur Vrest, e hell ar re a labour en diavêz tremen anezi e diou lodenn, da lavared eo e daou vloaz.

Digor eo al lisañs-se d'an oll studierien o-deus eun DEUG war n'eus forz peseurt danvez, o veza n'eus ket c'hoaz a DEUG war ar studioù keltieg. Evid ar re n'o-deus DEUG ebed e vez eun arnodenn espres e penn kenta ar bloaz, da weled hag-eñ eo uhel a-walh o live. Daou hent a heller heuill: pe studia ar yezou, pe ar zevenadur. An hini a fell dezañ studia ar yezou a vez lakeet da tremen eun arnodenn, ma vo gwelet hag-eñ eo barreg a-walh war ar brezoneg da veza gouest da heuill ar hentelioù. Peb studier a rank heuill c'hweh sertifikad hervez an hent e-neus choazet, ha daou all eo red dezañ kemer e-mesk c'hweh sertifikad an hent all: da skwer, an hini a studio ar yezou e vo red dezañ heuill c'hweh sertifikad (gramadeg, troidigeziou, lennegez, kembraeg, etc...), hag e vo goulennet digantañ choaz daou all etre istor Vreiz, etnologiez, kultur Breiz, etc... Ar re a gemer hent ar zevenadur a vo red dezo choaz da vihanna eur sertifikad brezoneg, d'en em varrekaad, pe da gomañs deski ar yez evid ar re n'o-deus ket he studiet biskoaz.

... Ha 70 el lisañs

Er bloaz-mañ ez eus war-dro deg ha tri-ugent studier o-deus lakeet o ano evid al lisañs, al lodenn vrasa o veza choazet ar c'hweh sertifikad war ar yez. Kalz aneze o-deus dija eul lisañs war eun danvez all, ha meur a hini o-deus eur vicher. Keit ha na vo ket gouvezet sklêr petra vo statut ar gelennerien war ar brezoneg en eil derez e vo kont evel-se, anad eo.

Ar re o-devo eul lisañs a hello sevel eur vestroniezh er bloaz war-lerh; greet a vez dija, med dindan anioù all, hervez al lisañs e-neus bet eur studier: da skwer, eul labour war gultur ha yez enez Eusa

a zo bet lakeet dindan talbenn an istor dre ma oa an hini e-neus savet anezi studier war an istor. War-lerh-ze ez eus eun trede sikl: er bloavez kenta e labourer war eun DEA (diplôme d'Etudes approfondies) ha daou vloaz goude-ze e tremener eun doktorezh trede sikl: a beb seurt labourioù a vez greet, hag eur bern traou a van d'ober! Darn a ra enklaskou war ar yezou (er mare-mañ rannyezoù ar brezoneg, implij ar brezoneg, distagadur ar hernevez er hrenn-amzer, etc...), darn all war al lennegez. Eun doktorezh a-berz ar skol-veur a heller tremen ivez, evid ar re n'o-dije ket greet o studioù en eur skol-veur hag a zo deut memestra da veza mistri war eun dachenn bennag (Tezenn vrudet Lan ar Berr war anioù ar pesked e brezoneg a zo eun doktorezh hag a ra enor da skol-veur Vrest). Evid echui, ez eus studierien hag a skriv eun doktorezh a-berz stad.

Eun diplom war ar studioù keltieg a vez tremenet ivez er skol-veur: hennez n'eo ket eun diplom a-berz stad, med diskouez a ra eo barreg an hini e-neus tremenet anezañ war ar brezoneg komzet, lennet ha skrivet, hag ivez e-neus studiet ar hembraeg (evid an diplom uhella).

Al levraoueg wella

Pa vezer o studial yezou evel ar galleg pe ar zaoneg e kaver heb poan levrioù a beb seurt; n'eo ket heñvel evid ar yezou keltieg. Kavoud a reer, eveljust, metodoù da zeski aneze, med pa vez c'hoant da vond pelloh e ranker mond d'eun nebeud levraouegoù leh ma'z eus bet dastumet levrioù koz ha nevez: ar plas gwella hirie an deiz eo levraoueg **Kreizenn an Enklaskou Brezoneg ha Keltieg** (Centre de recherches bretonnes et celtiques), e Skol-Veur Breiz-Izel. Dastumet a zo eno eun triweh mil levr bennag, koz ha nevez, oh ober war-dro kement a zell ouz Breiz, hag ar broioù keltieg (yezou, istor, arzou kaer, etc...). Kazetennoù ha ke-laouennoù a-leiz a zo eno ivez, ha setu e hell an neb a fell dezañ ober enklaskou dond da labourad di: digor eo al levraoueg d'an oll. (1).

Rag enklaskou a-leiz a zo d'ober war dachenn ar brezoneg ha Kultur Breiz-Izel: dre ne oa Skol-Veur ebed ez eo bet techet an enklaskerien da labourad nebeutoh dre amañ evid en tu all d'ar vro. Unan euz palioù kenta rann geltieg Vrest a zo kas war-raog

ar studiou war ar yez hag ar vro evel m'ema, en eur vond war ar plas da weled an traou hag an dud. Ma vez c'hoant da wellaad ar studiou brezoneg en deskadurez e vo red rei danvez d'ar gelennerien koulz ha d'ar vugale. Evel ma lavaren a-raog, n'eo ket labour a vank, ha postou all vo red mad sevel er Skoliou-Meur: eiz a gelennerien-klaskerien a vo prestig etre Roazon ha Brest, kement-se n'eo c'hoaz evid Breiz a-bez nemed ar gont a zo en unan euz Skoliou-Meur Bro-Gembre pe an Iwerzon!

J. Le Dû.

(1) Ma tigouez deoh kaoud levriou koz, pe kazetennou, pe c'hoaz lizerou koz, marteze memez lizerou skrivet en Brezoneg, e vefem laouen da houzoud, da zigemer anezo, pe neuze da fotokopia anezo: kement a draou a ha da goll... Skrivit da C.R.B.C., B.P. 860, 29287 Brest Cedex.

Leor ar miz

Pierre Trepos

Le pluriel breton

eun advoulladur hir-hortozet

30 lur (400g)

Raktres ar Rektor Rollin

Digemeret mad eo bet, evel just, menoz ar hlasou-êsaad diouyezeg, kinniget gand ar Rektor **P. Rollin** en e Raktres pe Plañ evid kas war-raog « Kelenn ar yezou ha kulturiou rannvro e Breiz » (S. ouz **Brud Nevez** 59, p. 53). Disklêriet e-neus **Emgleo Breiz** en eun notenn c'hweh pajenn ar pez a zoñj euz Raktres an Ao. Rollin. Berr-ha-berr:

1) **Kelenn Sevenadur Breiz** (istor, ekonomiezh, lennegezh, arzou, h.a...) a dle beza roet da oll vugale ha tudou yaouank ar skoliou a beb live pe derez, — e galleg : eur helennerezh dre red, eta. Hag o kelenn ar yez, na petra 'ta, e vo ivez desket d'ar skolidi lodennou a-bouez euz Sevenadur ar vro. Arabad eo na vefe studiet kultur Breiz nemed gand ar re yaouank o studia ar yez.

2) Red eo e teufe da veza posubl, dindan tri bloaveziad ar « Plañ Savary », e vefe kelennet ar brezoneg e **kement skol kenta derez e Breiz-izel**. Rag-se e ranker: a) kaoud tra-walh a « itineranted », skólerien ha skólêrezed, anezo brezonegerien, o kelenn or yez en eun toullad skoliou (1); b) **stumma** ar muia a heller a vistri-vrezonegerien evid ma vint karget euz ar helenn brezoneg en o skoliou.

3) Reiz eo aotren ma vo implijet ar brezoneg evid kelenn danveziou studi 'zo. Nemed e ranker kaoud kelennerien varreg evid an dra-ze. Eno e weler, eur wech muioh, talvoudegezh stummidigezh ar vistri.

4) A-du krenn emao, evel reiz, gand kaoud **klasou diouyezeg**, — ar menoz o veza bet roet lañs dezañ ganeom ouspenn vloaz 'zo. Dao e vefe kaoud unan bennag euz ar seurt klasou a-benn

miz gwengolo 83. Evid ar mare, n'anavezer nemed goulenn skolêrez Sant-Riwall, kinniget gand asant kerent bugale he skol: gour-hemennou dezi!

5) Bez' e kred da Emgleo Breiz eo dleet da gomz etre Rektor Roazon ha **Diwan**. Ma n'emañ ket an oll a-du gand lakaad skoliou Diwan dindan an Deskadurez-Stad, arabad eo ankounac'haad ar reolennoù etrevroadel hag a zo merket enno e tle beza roet da gement pobl pe lodenn euz eur bobl ar galloud da gelenn he bugale en he yez, ha pa vefe ar yez-se unan « minorezel ». Ar gudenn bouezusa a vefe da zelled outi a zo barregez pedagogel ar vistri.

6) Evid an Eil Derez koulz hag evid an hini kenta, e tle beza studiet, heb dale ken, bremañ, ha skol dre skol, penaoz en em gemer evid **kaoud e peb leh mistri barreg evid ar helenn brezoneg**. Evel-se e vo gellet taolenni bloaz dre vloaz etre 83-84 ha 85-86 krouidigez postou itineranted ha mistri karget euz ar Helenn brezoneg. Ma ne vez ket taolennet diwar-vremañ evid digoridigez ar skoliou e miz gwengolo a zeu, ha rag-gwelet evid an daou vloavez da heul, **neuze ne vo ket sevenet promesaou plañ Savary**.

7) Komz a ra notenn Emgleo Breiz euz eun toullad kudennoù all o tenna d'an Derez kenta ha d'an eil, d'ar Skoliou-Meur, d'ar Hlask Pedagogel, d'an Diellerez pe Dokumanterez.

(1) E Bro-Euskadi ez eus bremañ 24 a itineranted.

A.K.

Loeiz Roparz

Brezoneg 'n eur gana

– En ti bihan lein ar menez; kan ar hejer; Son ar c'hwenn: Pa oan o sevel lein ar roz; Biskoaz 'm-oa c'hoarzet kemend-all; Tond d'ar gêr euz a Rostren; Al laouenanig; Ev chistr 'ta, Laou; Kabiten St-Malo; Bannielou Lambaol; Ar hoz paotr-yaouank-koz; Metig.

Eul leorig: 7 lur (50g)

Eur vinikasedenn: 40 lur (100g)

DIWAN eun dibab etre daou zoare

Brud Nevez: Hag e hellit da genta-penn, addigas da zoñj perag eo bet savet **DIWAN**?

A.V. Chapalain: Digoret eo bet ar skoliou kenta **Diwan** e 1977, ha krog e oa ar gerent da brienti ha da bleustri war ar zoñj da zevel Diwan abaoe penn-kenta 1976.

Savet eo bet Diwan dre ma oa tud yaouank o-doa dibabet de-zevel o bugale e brezoneg ha c'hoant ganto skoliata anezo e brezoneg, ar pezh a zo reiz. Dre ma ne oa ket euz ar skoliou-ze d'ar mare-ze en deskadurez, ez eus bet divizet gand ar Vretoned kroui o skoliou o-unan, diwar skwer Euskariz o-doa krouet an **Ikastolak** e 1969.

B.N.: Hag e hellit lavared ped a vugale a zo bet tremenet dre Ziwan abaoe ar penn kenta. Ha ped a zo skoliataet bremañ (e-barz ar Finister, e-barz tachennad vrezoneg Aodouan-Hanternoz, e-barz tachennad vrezoneg ar Morbihan, er-mêz euz Breiz-Izel). Lavarit deom ivez war ar memez tro, ped a zo a beb oad, ped a zo dre skol, ped er skol a zo enni ar muia a vugale, ped en hini a zo enni an nebeuta a vugale.

A.V.C.: Ar skol a zo enni ar muia a vugale eo hini bro-Kemper (29 e miz kerzu 82, 35 evid goude Pask 83), staliet nevez 'zo e Kemper goude beza bet e Ploveill e-pad eun nebeud bloaveziou skol. Krouet eo bet e 77; gweled a reom ez eo ar skol vrasa unan euz ar re gosa. Tamm-ha-tamm e ya niver ar vugale war gresk e peb skol, dreist-oll goude an 3 bloavez kenta peurvuia, dre ma

teu ar skol da veza anavezet mad er vro, ha fiziañs a vez gand an dud o weled ar frouez o tond diouti.

An hini a zo enni an nebeuta a vugale eo hini an Naoned (6 bugel) dre ma tremen ar vugale aliez dre skol an Naoned a-raog dond endro gand o zud adkavet ganto labour e Breiz-Izel.

B.N.: Peseurt a ra kerent ar vugale? peseurt micher o-deus? hag e heller lavared ez int an oll pe ar bevrvasa anezo « euz an emzao », pe n'int ket?

A.V.C.: Izili Diwan, da lavared eo kerent ar vugale, n'int ket tud euz ar pezh a hellfed envel dre vraz « an emzao ». Dre vraz int tud na gaver ket e-barz pe endro da strolladou an emzao.

Micheriu izili Diwan:

Labourerien-douar.....	3,95%
Micherourien.....	6,70%
Implijidi.....	16,90%
« Kadred ».....	9,85%
Artizaned, kenwerzounen.....	8,45%
Micheriu yehed.....	8,45%
Micheriu sokial.....	5,60%
Kelennerien, skolaerien.....	15,50%
Kargidi.....	5,60%
Micheriu liesseurt.....	5,60%
Mammou er gêr.....	13,40%

B.N.: Ped a vugale a oar o zud brezoneg (o-daou pe unan anezo)? Ped a vugale a oar brezoneg oh en em gaoud er skol? mad pe mad a-walh? A-benn ar fin, ha greet e vez skol dezo e brezoneg penn-da-benn atao, pe ne vez ket? Ha dond a ra a-benn ar vugale da zeski brezoneg? Pa guita ar vugale ar skol, ha treset e vez eun daolenn euz ar gont a vrezoneg a ouzont? Peseurt « bilañ » a heller ober euz labour Diwan e-keñver ar brezoneg a-benn bremañ?

A.V.C.:

20% euz ar vugale ez eus brezonegerien euz o zad hag euz o mamm, an daou anezo.

60% euz ar vugale n'eus nemed unan euz o zud o houzoud brezoneg.

20% ne oar den brezoneg er gêr.

Ar vugale a oar brezoneg oh erruoud er skol eo an 20% ez eus brezonegerien euz o zud, hag eo ar brezoneg yez ar famil. Brezoneg a oar ivez eun darn euz an 60% ez eus eur brezoneger euz o zad pe euz o mamm. Niverusoh eo eta niver ar vugale o tond o komz galleg nemetken, med dre ma vez greet ar skol-vamm e brezoneg penn-da-benn e teskont buan-tre. Gwelet e vez bugale o teski dindan daou viz padal n'o-devoa morse klevet brezoneg a-raog er gêr. Ar bilañ zo êz d'ober: n'eus bugel ebed na ouife ket brezoneg (da lared eo komz, en em zantoud êz e brezoneg) pa hoarvez gantañ kuitaad Diwan da 6 vloaz, med muioh-mui e chom ar vugale e kenta derez Diwan evid deski lenn ha skriva e brezoneg.

B.N.: Komzom ivez euz ar skolaerien: penaoz o-deus int desket o micher? Hag o-deus an oll eun diplom skolaer? Hag eun diplom brezoneg bennag? Penaoz e vezont dibabet? Daoust hag ar memez doare kelennadurez o-deus oll (Freinet da skwer?)

A.V.C.: Skolaerien genta Diwan o-deus desket o micher en eur ober skol d'ar vugale. Bremañ e vez implijet an dud abaoe eur pennad mad dija evel-henn:

1) an dud c'hoant ganto beza skolaerien Diwan a vez lakeet da dremen dirag eur gomision implij (enni skolaerien, ar huzulier pedagogel, kerent...).

Barnet e vez e-kerz an abadenn-ze:

– brezoneg an dud-ze, dre skrid ha dre gomz.

– ar skiant prenet o-deus gelllet tapoud gand bugale.

Kemeret e vezont pe get e-giz stajidi Diwan.

Ar re zibabet a ra eur staj 5 mizvez:

– o labourad war ar brezoneg;

– o kemer perz e emvoudou labour ar skolaerien;

– o vond da zeski o micher e klasou Diwan, med e klasou galleg ivez.

2) Goude ar 5 miz e tremenont endro dirag ar gomision.

– studiet e vez neuze al labour kaset da benn gand ar stajidi e-kerz ar 5 miz kenta (yez, pedagogiez). Goulennet e vez ali ar skolaerien o-deus degemeret ar stajidi en o skol.

– divizet e vez neuze kenderhel gand ar staj, pe eur prantad amod pe get.

3) Ar stajidi dibabet da heul an eil gomision a rank ober neuze 4 miz ha prienti eur renta-kont pe eun dezenn vihan war eun danvez resiz o tenna da Ziwan (ritm), pe brezoneg gand margodennou da skwer).

Tremen a reont eun trede gwech evid beza kemeret da vad e-giz skolaerien pe get.

Setu an hent da heulia evid dond da zeski ar vicher skolaer gand Diwan.

Goulennet e vez digand stajidi ha skolaerien Diwan labourad evid tapoud an aotragez war ar brezoneg dre ma'z eo evid ar poent an diplom brezoneg nemetañ a dalvoudegez.

Anad eo ez int prest da labourad evid tremen ar C.A.P. dindan eun nebeud bloaveziou evid kaoud eun diplom par da hini skolaerien all an deskadurez. Pa vo krouet eur rann evid deski ar vicher skolaer e skol ar vistri e vo gwelloc'h c'hoaz rag evid poent e vez desket ober kenteliou brezoneg ha neket skoliata e brezoneg.

Dre al labour kaset war-raog gand skolaerien Diwan ha reou an lkastolak e-kerz o emvoudou reolieg ez eus bet kavet eur pedagogiez a glot gand ar brezoneg hag ezommou ar vugale war eun dro. Chom a ra dieub peb skolaer da weled an doareou gwella d'henn ober.

B.N.: Pehini eo roll ar gerent er skol? hag ez int « patroned » ar skol? Dalhmad e lavarit eo ar skoliou Diwan evid netra: med pa vez goulennet, sañset, kement a labouriou hag a oberiantizou a beb seurt digand ar gerent, ha n'eo ket neuze evel pa baefent ar skol?

A.V.C.: Ar gerent n'int ket « patroned » ar skol, pell ahane, izili ar gevredigez int, evel ar skolaerien pe an dud hopret all. Kas a reont war-raog ar skol sikouret gand ar skolaerien hag eur huzul-skoazell. Al labour greet gand ar gerent ne hell ket beza keñveriet gand eur paeamant bennag evid ar skol, rag n'eo ket rediet an dud da labourad! Skoliou Diwan an zo **laik, digor d'an oll ha digoust** ha bez' ez eus tud c'hoant ganto rei eun deskadurez vrezoneg d'o bugale ha ne labouront ket (sevel goueliou hag all...) evel 'barz forz peseurt strollad pe sindikad eo, bez' ez eus tud mennet hag a zamm muioh a labour war o chouk, ha tud all a-du med nebeutoh a reont evel er skoliou all, aliez eo ivez ar memez tud a ra war-dro kermes ar skol pe an Amicale Laïque hag all...

B.N.: An dud a zikour Diwan, ped a zo anezo e gwirionez? Ha kaoud a ra deoh eo rei arhant beb miz da Ziwan an doare efedusa da rei lañs d'ar brezoneg?

A.V.C.: Bez' ez eus deg miliadou a dud o sikour Diwan, evid lod gwech ar mare, lod all er huzulioù skoazell, lod all c'hoaz en eun doare ingal. Bez' ez eus ousspenn 3.000 a dud o rei arhant beb miz da Ziwan. An dud a blij dezo rei arhant d'eur skol Diwan peogwir e welont mad e talvez d'eun dra bennag.

B.N.: E peleh ema erru ho taremprejou gand an Akademiez hag an Deskadurez? Petra en-deus lakaet ahanoh da damall da zindikad ar F.E.N. labourad a-eneb deoh?

A.V.C.: Darempredou ingal 'z eus bet etre Diwan hag an Deskadurez abaoe ousspenn bloaz, med gweled a reom ne ya ket gwall founnuz an traou war-raog evid sevel **ar servij publig a zeskadurez**. Kinnigou zo bet greet ha gand an Akademiez ha gand Diwan. Evid ar poent n'eus bet sinet emgleo ebed.

Ar pezh en-deus lakaet ahanom da damall ar F.E.N.: gweled a reom mad ne ra ket ar F.E.N. ar pezh a hellfe evid ledannaad tachenn ar brezoneg er skol, da lavared eo evid rei d'ar brezoneg e blas reiz. Tamall a ra ar F.E.N. da Ziwan beza eur skol prevez peogwir ne fell ket dezi e teufe eur skol ollvrezoneg er servij publig. Perag ne fell ket dezi digemer Diwan, pa houlenn mod all e vefe savet eur sistem publig a zeskadurez gand

ar skoliou kristen enframmet. Ar re-mañ zo prevez koulskoude hag e fell dezo chom prevez! Perag nah Diwan hag a zo laik ha digor d'an oll, neuze?

Pedi a reom ar F.E.N. da zond d'eun emvod evid kaoud eun diviz war ar gudenn.

Ne zoñj ket deom ema an oll zindikajou eneb deom, forz penaoz an traou a hell cheñch.

B.N.: Ha soñjal a ra deoh bepred, evel m'eo bet lavaret ha skrivet ken aliez, n'eus nemed ar skoliou Diwan hag a hell savetei ar brezoneg? Ne gav ket deoh ne vo morse darempredet ho skoliou nemed gand eun dibab a dud? Beteg peseurt poent e hellont kreski? Ne gav ket deoh e komzer re euz Diwan hag e vez ankoueet al lodenn vrasa euz ar vugale, ha n'emaint ket int e Diwan?

A.V.C.: Ne zoñj ket deom n'eus nemed skoliou Diwan hag a hell savetei ar brezoneg, med respont a reont da ezommou ar Vretoned da genta ha dre ze e kreñvaont ar brezoneg. Ne heller ket lavared e vez darempredet skoliou Diwan gand eun dibab a dud, larom kentoh eun niver bihan a dud, da genta, o-deus meizet buannoh e oa red kroui anezo, med darempredet e vezont dres gand eun niver brasoh-brasa a dud a vloaz da vloaz. Ne fell ket da Ziwan lakaad e peb leh e Breiz skoliou brezoneg e plas ar reou en galleg, pezh a fell deom eo e vefe roet an tu d'ar Vretoned da zibab etre daou zoare:

1) eur skol e brezoneg:

- brezoneg penn-da-benn er skol-vamm;
- ar galleg o tond tamm-ha-tamm er henta derez.

2) eur skol e galleg, ar brezoneg o veza desket enni tamm-ha-tamm d'ar vugale.

An daou a responto da ezommou ar Vretoned.

Galvadenn da lennerien ha mignoned Brud Nevez :

Lakaad war ar stern kenta bloaveziad « plañ » Savary!

Eun elfenn a hoanag a zo bet digaset da zivinnerien ar brezoneg gand ar « Mennad » pe Raktres embannet gand Rektor Akademiez Roazon evid lakaad brasoh kresk war gelenn yezou ha kulturioù Breiz. A-douez kinnigou an Aotrou Rollin, e tleer gweled dreist-oll, en Derez kenta, krouidigez

idigez **klasou-arnodi diouyezeg**, hag, en Eil Derez, servijou nevez evid kelenn ar brezoneg e 1983. Hervez notenn ar Rektor, studi an nevezintiou-ze a zo bet lakaet en hent hag ar Sindikajou koulz ha kenseurterd all bet goulennet o ali diganto (strolladou, tud dilennet) a ouezo heb dale ar pezh a vo bet divizet.

Selled a ra **ar Gellennerien Vrezoneg** ouz kinnigou an Ao. Rollin evel ouz eun dra nevez a-bouez. Hag, - heb koll eñvor euz ar herseennou bet gouzañvet kentoh, - e kred dezo eo evid digor ar skoliou e miz gwen-golo a zeu e ranker striva hiviziken. Rag-se, e fell ganto heulia, a-unan gand an emzavioù all, labourioù ar zervichou ofisiel. Ar pal boutin o veza studia a-dost-tre penaoz lakaad da vond endro kelenn ar brezoneg e skoliou, liseou ha skolachou Breiz a-hed an tri bloavezh da zond, hervez ar « plañ » bet kemennet gand ministr an Deskadurez.

Er hiz-se, goude beza bet dastumet eun niver brao a zinaturioù d'o galvadenn genta er miziou tremenet, o-deus **ar Gellennerien Vrezoneg** divizet cheñch eun tamm bennag o skrid-orin. Kavet e vo amañ da heul ar pennad nevez kinniget ganto: berroh eo evid hini an hañv diweza, ken sklêr ha stard e houlennoù avad...

Dastum kantadou a zinaturiou evid skrid ar **Gelennerien Vrezoneg** a vo eun doare euz ar gwella da skoazella e vefe sevenet da vad ar Plañ-Tri-Bloaz adal 83-84, - kerkoulz ha promesaou Prezidant ar Republik ha re ar Strolladou a gaver e diabarz ar gouarnamant. Evid harpa ar halvadenn amañ da heul, tra-walh eo kas eur gerig berr evel hemañ: **Sina ran skrid ar Gelennerien Vrezoneg**, ha lakaad war ar golo-lizer: **Kelennerien Vrezoneg**, Bureoiou 23/24, Ti ar Bobl, Plasenn H. Mazé, 29200 Brest. Eur follenn pe meur a hini a vo kaset deoh, ma karit, evidoh gelloud dastum zinaturiou ho mignoned hag amezeien.

Setu amañ da heul skrid ar **Gelennerien Vrezoneg**:

Sina reom galvadenn ar Gelennerien Vrezoneg

O tigas da zoñj komzou Prezidant ar Republik diwar-benn kelenn ar « yezou ha sevenaduriou-rannvro », o terhel kont euz ar hlemmou da heul kemennadureziou Alan Savary, ministr an Deskadurez, e miz mezeven diweza, ha da heul ar mennad bet savet gand Kuzul Sevenadurel Breiz d'an 29 a viz du 1982, - e houleniom-ni:

1) ma vo **reizet** kemennadureziou A. Savary, war ar poentou bet enebet outo. ha ma vint **klokaet** evel ma tere;

2) ma vo strivet, amañ, e Breiz, evid kas da benn-mad ar **Plañ-3-bloaz** bet disklêriet gand ar Ministr, gand ragaoza anezañ, **skol dre skol**, evid ar maread 1983-1986, e sell kroui ar zervichou kelennerien red o haoud;

3) Goulenn a reom-ni, ouspenn-ze, e vefe lakeet war ar studi ha digemeret gand ar Parlamant eul **Lezenn-stur** o tiazeza eur statut evid Yezou ha Sevenaduriou Bro-Hall gand rei dezo o flas penn-da-benn e kement tachenn zo (Deskadurez, media, Buhez foran).

Lakait war eur baperenn ar zinaturiou ho-po dastumet pe goulennit skrid ar Gelennerien Vrezoneg en eur skriva d'ar chomleh-mañ: Ar Gelennerien Vrezoneg, Bureo 23-24, Ti ar Bobl, Plasenn H. Mazé, 29200 Brest.

Kaset e vo deoh eur skwerenn bennag gand paperennou all diwar-benn ar helenn brezoneg.

Eun drohadenn euz ar vuhez.

Eul leor enivrennou ec hini Herve **Herri** (1), enivrennou eur micherour, eur mouller a-wechall a anavez dre ar munut e vicher hag a gar anezi. Eur hostez teknikel a zo en oberenn-mañ, kalz traou kenteliuz diwar-benn doareou-ober al lizerenner pe ar mândreser, ment ar paper. h.a. Santoud a reer c'hwez al liou ha kleved trouz ar mekanikou. D'ar mare-ze, er bloaveziou ugent, ar moullerez ne oa ket deuet da veza elektronik penna-da-benn, chom a ree c'hoaz astizanel ha diouz mab-den e meur a geñver. Peurvuia ar voullerien a oa artizaned ampart hag aliez gwir arzouien.

Kaset eo bet Herve Herri da zeskard yaouank-flamm, a-raog e zaouzeg vloaz, ar bloavez pemzeg, e Montroulez e gêr hinidig. Goude eo bet eet da labourad ha d'en em wellaad e meur a gêr all, Brest, Sant-Brieg, Pariz, Roazon e leh eo chomet evid mad, gounezet gantafi e halofisou. Tro e-neus evel-se da rei deom eun alberz euz ar vuhez d'ar mare-ze er hêniou ma'z eo tremenet dre enno, Montroulez dreist-oll e-pad ar brezel pevarzeg.

D'an amzer-ze micher ar mouller a oa skuizuz hag inoueuz aliez, an devez-labour kalz hirron eged breman. Skañvaet e veze ar boan koulskoude

gand kanaouennou (e brezoneg e Montroulez), farsadennou ha troiou-kamm c'hoarizet gand an deskarded d'ar vicherourien gosoh. Plijadur a veze. Kalz troiou-kamm fentuz a gont Herve Herri. Peadra da hoarzin.

Hag eur geneiliz winon a unane etrezo micherourien « Al Leor ». Dalhet e-neus soñj Herve Herri euz meur a geneil hag a genlabourer digouezet war e hent, oristaled aliez, c'hwero a-wechou o flanedenn. Kontet eo brao o istor, fentuz hag esmaeiz war eun dro, da skwer hini Klovis e penn diweza al leor a zo dispar. Ne glask ket an oberour stumma eul leor renket an darvoudou ennañ hervez an urz, mond a ra kentoh du-mañ du-hont en eur zerhel e frankiz, ar pezh n'eo ket dispiluz tamm ebed.

Setu eul leor ha n'e-neus ennañ nemed ar wirionez, eul leor leal, eun drohadenn euz ar vuhez. « Evel-se e oa » Herve Herri, eur spered lemm, eur galon gizidig ha brokuz. Ar brezoneg a zo mad-tre, sklêr, reiz ha beo.

P.M. MEVEL.

(1) **Herve Herri. Evel-se e oa.**
Embannet gand **Al Liamm**.

Eul lennegez a-vremañ, gand geriou arnevez.

Eur romant eo **Porzh an Ifern** (1), hag eur mell hini peogwir ez eus ennañ 307 pajenn. Lavarom dioustu n'eo ket eun oberenn éz-tre da lenn, ar yez a zo pinvidig ha gouizieg, gand eun niver braz a heriou nevez-stummet. N'ema ket amañ al leh nag ar mare da vreutaad diwar-benn govelia genou nevez. Egwirionez, goude beza lennet an hanter-kant pajenn genta, e teuer d'en em voaza hag ar peurtest a ya kalz buannoñ war-raog. Ouspenn e vezer sikouret gand roll ar geriou dibaot, pourchaset gand al leor (stagadenn), ha dreist-oll gand **Geriadur ar brezoneg arnevez** (Imbourc'h, 1980). Evel-se e heller gouzoud penaoz « araezhlastiñ » a dalv kement ha « moyen anti-conceptionnel », ar pezh n'eo ket nebeud a dra.

Evelato, ne skuizer ket o heulia e « Porzh an Ifern » istor buhez Eosten Kerveog, eur vuhez vantruz, leun a zarvoudou dreist-ordinal hag a gas anezañ war meur a hent a-dreuz ar béd. Disklêna a ra e-unan e blanedenn d'ruhez. Mab da vourhizien binvidig euz Bro-Roazon, Eosten Kerveog a goll buan ar feiz, dond a ra zoken da veza « enebour da Zoue », dispaher a vicher, kleizelour, spontelour divorhed, torfedour ha muntrer a-benn ar fin. Perag an dra-ze?

Da genta abalamour e-neus market dezañ en e vugaleaj karantez wirion e dad hag e vamm, sammet gand o frederiou dezo o-unan. Studier e Roazon, Eosten Kerveog a ren ar stourm en Emsav Vrezon, hag eur wech deuet da veza mezeg, arben-nigour war ar bredkleivedoniezh (2), goude eun distag fall gand ar plah yaouank a gare, e ya d'ar Stadou-Unanet, e leh ma kendalh e obere-rez a zispaher. Goude eun hold-up c'hwitet, setu-erñ toullbahet. Eur wech dibrizoniet, e ra adarre meur ha meur a daol-ésé, en eur vrasaad bepred e skiant-prenet. Bremaig e kavim anezañ amañ hag a-hont dre ar béd, o klask skoulma liammou gand ar hreizennou dispahel, en Amerik ar Su, er Hampoutchea (Kambodj) e leh ma'z eo taolet en eur hamp prizonidi gand ar Gmered Ruz. Nag a avantunou, bourruz-ke-nañ da lenn! Na ped ha ped gwech eo bet e vuhez en arvar! Distrei a ra Eosten Kerveog da Roazon hag e adkemer ar stourm e Breiz. Goude beza labouret war-dro ar siohanerez (3), treiset gand eur mignon, eo paket on den o tougen armou e sell ober eun taol fall bennag, ha kraouiet adarre. Eur wech lezet da vond, e timez d'eur plah yaouank hag a vezo e verzerez diwezatah, mond a reont da jom en eul leh digenvez, e-kreiz koajou Kenekân, arvet « Porzh an Ifern ». A-

mañ e teu soñj deom euz an istoriou kontet gand ar Markiz De Sade. Eosten Kerveog a laz seiz krouadur dezañ, da zevez o ganedigez end-eeun, evel kizier bihan, en eur veuzi anezo en dour klouar. Laza a ra ivez e wreg gand eun taol boomerang, eun torfed disi. Hag ar romant a echu war eun darzadenn dinamit spontuz, distrujet eo Porzh an Ifern ha pulluhet e ber-henn.

Ne heller ket avad e berr-gomzou renta kont euz kement darvoud a vez kavet e leor Youenn Olier, hag ouspenn ne fell ket din diskulia peb ha Lennit hag e ouezoh, ne golloh ket hoh amzer, me asur deoh.

Eur romant pinvidig-meurbed eo Porzh an Ifern, leun a vuhez, eun

oberenn greñv, enni filozofiezh, prederadennoù war ar relijion, ar politikerezh, an istor, war kudennoù an amzer-vremañ. N'eo ket folklorachou a gaver amañ, hogen eul lennegez vodern. Ha setu perag e oa red-mad d'an oberour ober gand genou arnevez. Eun oberenn a-bouez avad, bourruz penn-da-benn, enni boued founnuz evid ar spered.

P.M. MEVEL.

- (1) Youenn Olier. **Porzh an Ifern** Embannet gand Imbourc'h gouere 1982.
- (2) spécialiste en psychopathologie.
- (3) pratique de l'avortement.

Kristian BRISSON

AR REDER-MOR

Romant pe varzoneg?
Deoh da varn!

25 lur digand Brud Nevez (kuit a vizou kas).

Lizerou

– Diwar-benn **F. Gourvil** (Nn 59, pajenn 47): skriva a ran va ano **Ar Pach** hervez an distagadur euz **Le Page** (« A Pach » e gwirionez), e Kemeneven (Bro-Hlzig). **Le Page** a oa bet troet diwar **Ar Floc'h** er XVIIved kantved. Ne gredan ket e kouezan en eur « racisme pur et simple » en eur ober evel-se. A-hend-all, n'hellan ket beza gouennelour (tamm ebed!) rag eun nevez-vreizad a orin italianad ha flandread (euz Bro-Hall ha Bro-Veljik war eun dro) a zo ahanon. Me zo a-du gand S. Hewitt, kentoh...
E. Pianezza Ar Pach, 78 L'Etang-la-Ville.

– Ho pedi a ran da reseo va gwella hetou a gresk hag a wellaenn evid ar bloavez 1983. Er mareou-mañ, n'eus ket e gwirionez eur maread abegou da hortoz ar « Chañ-chamant » war dachenn ar brezoneg, d'an nebeuta a-berz ar Stad. Koulskoude, e talhan da gaoud fiziañs. Forz penaoz, gouzoud a ran ervad e reoh ho seiz posubl evid mond war-raog. Bloavez mad.

E.G., Kleder.

– Lennet 'm-eus an niverenn euz **Brud Nevez** kinniget deom. Plijuz-kenañ 'm-eus kavet ar gelaouenn. An doare-skriva a zo tost ouz ar brezoneg kaozeet em-eus klevet e-pad va yaouankiz e Bro-Leon. C'hoant am-eus kaoud anezi beb miz. Gand al lizer-mañ e kavoh eur chekenn-bost a 60 lur evid va houmanant-bloaz...

Y. B., Redon.

– Resevet mad em-eus an niverenn 60 euz **Brud Nevez**, ken plijuz da lenn atô, hag e welan, e roll al leoriou, eo bet embannet an niverenn 4 deuz geriadur **Du-Berr**. Keid-all e oan o hortoz anezi da zond er-mêz.

Y.B., Douarnenez.

– Kerkent ha resevet niverenn ziweza va houmanant, e kasan deoh va chekenn-vank a 60 lur. Tri bloaz 'zo on koumanantet, ha n'eo ket bremañ e paouezin. Plijadur a gavan o lenn ho kazetenn ken mad. Traou 'zo ne blijont ket din, med evel peb kazetenn, n'eo ket posubl kaoud pennadoù o plijoud da doud an dud. Evid ar bloaz-mañ, n'hellan nemed reketi deoh ha d'an oll skipaill er bloavez mad.

M.C., Argenteuil.

– Muioh a blijadur am-eus o lenn **Brud Nevez** bremañ, rag kalz muioh a draou a zo e-barz. Kendalhit!

L.C.

– Da heul ar hemenn embannet war ar gazetenn **Brest-Espoir**, e vefen dedennet d'ober anaoudegez gand **Brud Nevez**, rag brezoneg ah ouzon. Hag ho-pije ar vadelez da zigas din eun niverenn anezi? Trugarez deoh, en a-raog.

B.M., Sant-Tegonneg.

Daou lizer on-eus bet a-hend-all digand **Mikael Madeg**. Keredol, Sant-Tonan, 29 220 Landerne. En hini kenta, e klask kenlabourerien da zastum leshanoioù:

« Marteze ho-peus klevet e vezan o labourad war dro leshanoioù an dud, ken e brezoneg ken e galloeg (hag ivez, evid lavared ar wirionez, en oll yezou keltieg tramor). O prienti eun dezenn ha meur a leor (an oll anezo e brezoneg) emañ war an danvez-mañ. Klask a ran ober labour dastum aketusa ma hellan. Med berr e vez an amzer ganin eun tamm gand al labour-mañ war eun dachenn ken braz, evel just. Ouspenn va micher gelenner.

Setu ma teuan d'ho tirenka da houlen diganeoh ha ne vefeh ket prest d'am zikour gand leshanoioù a anavezfeh-c'hwi (...)

Ma zo darn hag a fell dezo sikour M. Madeg, e hellont skriva dezañ. En eil lizer e kinnig sevel eur festival filmou brezoneg:

Raktres festival filmou brezoneg

Mad e vefe klask ober eur festival filmou brezoneg, eun tammig evel ar pez a vez greet e Douarnenez nemed d'eur poent all hag en eul leh all.

Kinnig a reom e vefe greet e Bro-Leon: e Brest e vefe tu da genlabourad gand ar **P.A.C.** koz (eno ez eus mekanikou diskouez filmou video hag a-hend-all). E Landerne ez eus eur zal « arts et essais ». Pe e Lezvenen marteze (paneved ha Gouel Bro-Leon a vo greet eno beb bloaz diwar-vremañ).

Soñj on-eus kinnig ar raktres-mañ d'ar strolladou hag aozadurioù-mañ da genta: F.R.3 Roazon, P.A.C. Brest. Centre breton d'arts populaires Brest, Ar Falz, Emgleo Bro-Leon, Skol an Emsav, Emgleo Breiz... ha da dud o-unan: Nicole ha Felix ar Garreg.

Peseurt filmou?

Dreist-oll filmou tele, dre m'eo ind-i ar re niverusa, a-bell. Setu marteze e hellfe ar festival beza anvet **Festival Breiz o veva?** Med ivez an oll filmou all a vo, ha marteze filmou er yezou keltieg all.

Goulennet e vefe digand ar re o-deus kenlabouret da zevel filmou B.O.V.: realizatourien ha kinnigourien (produktourien) choaz pep hini eur film a gavont-int ar gwella greet ganto. Diwezatah e vefe greet beb (eil?) bloaz ar festival ha gand filmou nevez beb tro.

Pal ar festival:

Rei bruderez da labour F.R.3, ha dre vraz d'ar filma e brezoneg, barn ivez an obrennou greet en eur rei prizioù dezo, rei eul leh ivez d'ar zaverien filmou a youl vad da ziskouez o filmou. Ha, dre vraz, brouda krouerien Vreiz d'en em drei muioh-mui etrezeg ar filma e brezoneg.

Yez ar festival: Brezoneg a vefe yez ofisiel ar festival, ne vefe na troet ar filmou nag ar prezegennou nag ar barnadennoù.

Barnerez: Eur juri a vefe savet, karget da varn aketuz ar filmou.

An oll dud a vefe intereset da zikour e mod pe vod a zo pedet da gas kelou deom.

Alan an Diuzed

Lenaig

Eur romant a garantez

15 lur (150g)

Keleier ar miz

Euz an eil devez d'egile

– Ar bloaz-mañ, eo d'an 9 ha d'an 10 a viz ebrl e vo **Kan ar Bobl**, en Oriant. Med a-benn neuze, e vo bet devezioù dibab e kement korn euz a Vreiz. Setu amañ an devezioù a zo bet dalhet evid an dibabou-ze: d'an 13 a viz c'hwevrer, Nort-sur-Erdre ha Speied; d'an 19, Erbrée; d'an 20, Plabenneg ha Gwerliskin; d'ar 27, Bubri ha Bañleg; d'an 12 ha 13 a viz meurzh, Lanruven; d'an 20, Sant-Visant-war-Oust ha Plemet. Sonerez ha kaniri a vo c'hoaz dre ar vro...

– Nag eo bet chañsuz ar Vretoned e fin ar bloaz tremenet. Whisky o-deus kavet darn en aot. Eur martolod a goñvers euz Ploueg e-neus e wreg gonezet 6.400.000 lur o hoari loto. Ouspenn 3 milion all a zo bet gonezet el Loto bepred gand eur famill all euz Moñkoñtour. Euz ostiz euz Kemperle e-neus tapet kaoud 1.798.329 lur en eur hoari ar « harté ». Ar re a zo e karg euz **Brud Nevez**, ha ne vez ket druz ar peuri ganto bepred, a raje vad dezo gonid eun nebeud milionou evel se ivez. Beteg-henn, n'o-deus ket klasket memez...

– Daouzeg vloaz 'zo eh embanne ingal **Roger Laouenan** war an **Télégramme** keleier sizunieg o tenna d'ar brezoneg, d'al lennegezh ha d'ar vuhez sevenadurel. Kroget fall eo ar bloavezh 83 evitañ: d'an 3 a viz genver, eo bet moulet e bennad diweza. Abaoe ne vez ken **Aux quatre vents de la culture bretonne**. Lavaret e vije bet dezañ ne oa ket dennet lennerien ar gazetenn gand seurt keleier.

– Eur Vretonez yaouank a 18 vloaz, mar plij, eo a zo bet dibabet da eil daofinez **Miss France: Valérie Guenver** an hini eo. Euz Sant-Brieg eo, hag oh ober he studiu e skol-veur Roazon, war ar yezou sañset. Ne lavarer ket toud diwar he fenn, med 1,70 m a ra, hag he-deus bleo melen ha daoulagad glaz...

- Cheñchamanchou all a zo bet c'hoaz war dachenn ar radio e Breiz. Goude ma oa bet savet **R.B.I.**, en doare a oar an oll, e miz eost warlene, eo bet da dro **Radio an Arvorig** da dremen dindan **radio-France**, d'ar henta a viz genver. Al lezenn eo, hiviziken, hag eo bet dispartiet ar radio diouz an tele. Da weled, pe da zelaou kentoh, n'eus netra cheñchet koulskoude, evid ar poent. An abadennou eo ar memez re, an animatourien ivez. Nemed eo bet kresket an niver a gazetennerien e Roazon evel e Gwened.

Derhel a ra ivez da skigna 3 eur abadennou bemdeiz nemetken, pa vez greet 17 eur gand R.B.I. ha gand **Radio-Mayenne**. Penaoz e ray neuze da zerhel an taol? En em houlenñ a ra ouspenn lod euz heh animatourien petra teuint da veza, ha peseurt doare-radio vint lakeet d'ober en amzer-da-zond: eur radio a gompagnunez nemetken (eun tamm evel R.B.I.) pe eur wir radio gand abadennou frammet ha danvez enno? Peseurt abadennou brezoneg, ouspenn-ze, a ginnigo Radio an Arvorig da Vreiz-Uheliz: traou adtommet, bet amprestet digand R.B.I., bepred! Pe traou fresk eun dro bennag?

- War **Radio an Arvorig**, o-deus da nebeuta **J.P. Pichard** hag **H. Jaouen** skignet o 300ved abadenn **La musique des Bretons**, d'an 9 a viz genver. E 1977 an hini oant kroget ganti. Da genta, ne daolent evez nemed euz ar muzik 'giz ar vro, en eur ster striz a-walh (ha dreist-oll euz ar zonerezh bagadou). Abaoe int digoroh war doareou muzik all. Danvez a-zoare o-deus bet kinniget a-wechou d'o zelaouerien, a-wechou all evelkent eo bet eun tamm re skañv o abadennou... Abaoe m'eo bet savet R.B.I., ne vez ket klevet ken « la Musique des Bretons » e Breiz-Izel, ha ne zeblant ket e vije eun abadenn euz ar memez seurt war ar radio nevez...

- E miz kerzu, ez eus bet eun nebeud lazou-kana oh en em voda e Gwengamp. D'ar 4 ha d'ar 5 a viz even da zond, eo bet roet da houzaoued gand **Kreizenn an Arzou-Pobl** e vije e Brest eur genstrivadeg lazou-kana euz ar broiou keltieg. E meur a rumm, e vint ingalet, ha prziou a vo da honid. Hag e roio eur seurt konkour eul lañs nevez d'an han a-stroll e Breiz?

E 1983, e vo da nebeuta 24 a chantieriou gand **Breiz Santel**, da ad-sevel ha da zresa chapelioù, kalvarioù ha feunteunioù. Ar muia anezho a vo e miz gouere hag e miz eost, mez bez' e vo ivez e miz c'hwevrer, miz ebrel ha miz mae.

- Hanter amzer a vrezoneg a vo greet e skol publik Sant-Riwal adaleg digor ar skolioù, e miz gwengolo 83. Setu ar pez a zo bet divizet gand

ar gerent, ar skolaerezh, an Inspektour Akademiezh, hag all... goude ma vije bet roet an tu gand kelhlizer nevez ar Rektor d'ober seurt taoliou-èsé. Beteg-vremañ avad, e seblant skol Sant-Riwal beza an hini nemeti hag a glaskje mond deuz an tu-ze. 12 a vugale eo a zo o tarempredi anezi.

- **Si j'avais 1000 ans**: sed an titr euz eur film a zo bet troet er Hab Frehel gand **Monique Enckell** eur barizianez « hag a oa Bretoned euz he zud-koz », emezi! Danvez ar film: an tremen euz an 31 a viz here d'ar henta a viz du, kala-goañv, er vojenn hag en amzer-vremañ. **Alan Stivell** eo a zo sañset da skriva muzik ar film. Gand ar Chart eo bet sikouret trei anezañ.

- Eur jury a vugale oajet a 10-12 vloaz eo e-noa da zibab da biou rei ar priz **Salon de l'enfance et de la jeunesse**. Eur skrivagner a Vreiz eo o-deus prziat, **Yvon Mauffret**, hag a zo o chom e Lokentaz. E leor **Pour un petit chien gris**, embannet gand an « Editions de l'Amitié » eo e 48ved romant da Y. Mauffret skriva evid ar yaouankiz. Eun nebeud bloaveziou zo e skriva c'hoaz romanchou doare seven dezo. Bremañ, emezañ, e houlenñ ar grennarded eun digoradur war ar vuhez hag he problemou, med arabad evid se laza an huñvre en o hreiz.

- Douetañs he-deus **Unvaniezh ar Gelernerien** war ar brezoneg e vije aozet ar stajou brezoneg evid ar vistri en eun doare siruz. Ne vo ar bloaz-mañ nemed 4 a stajou a seurt-se (e-leh 6 a-raog), ha ne badint nemed 3 devez (e-leh 4). Ouspenn-ze, kalz re ziwезд e vije bet roet kelou d'an animatourien o-doa da vond d'ober prezegennoù er stajou. Evid an « Unvaniezh », ne ra ar sistem a zo o ren ahanom nemed ober goap ahanom.

- War an ton braz eo bet lidet ar bloaz-mañ pardon Plevin, en enor d'an tad euruz **Juluan Maner**: 300 vloaz 'zo eo marvet er barrez-se, stok euz Karaez, d'an 28 a viz genver 1683. Deuet e oa aotrou 'n Eskob Sant-Brieg, an ao. Kervenig, da gana overenn ar pardon gand 30 a ve-leien. « An tad mad » eo bet leshanvet an tad Maner, hag a brezege dre daolennou, da geñver misionou braz. E-kerz ar bloaveziou tremenet, zo bet leoriou istor koulz ha kanaouennoù ha peziou-c'hoari o tamall anezañ abalamour d'ar perz a gemeras da vestronia dispah ar Bonedou Ruz.

- Eur hlab a zoñjerien hag a brederourien eo, sañset, an hini a zo bet savet dindan an talbenn **Bretagne-Europe**. D'ar 15 a viz genver, e-neus ar hlab anvet **Carlonn** da veza e brezidantez. Oh en em ziazeza war zivizou emgleo 1532, hag a lavaront n'eo ket bet torret c'hoaz.

e houlennot ma vije adstaget bro an Naoned ouz ar peurrest euz Breiz. Goulenn a reont ivez ma vije roet an droed d'ar Vretoned da vrezonekaad an anoïou-famill hag a vije bet gallekaet « a re ».

– An ao **Ruellan** hag a oa a-raog e Gwened, a zo bet anvet e Roazon da veza e karg euz ar muzik e Breiz. E zoñj a zo da zigori eun ti euz ar muzik e Breiz, e-tal Roazon, e Châteaugiron. Da hortoz ze, e-neus dièzteriou gand **Kreizenn ar Han e Breiz**, ha ne blij ket dezi tamm ebed an doare m'eo renet beteg-henn...

– « War an dachenn », eo e fell da Brezidant nevez **B.A.S. (Bodadeg ar Zonerien)** labourad evid ar muia. Setu c'hoaz ar pezh e-neus disklêriet **Martial Pezennec** e Plañwour da geñver ar vodadeg-veur a zo bet d'an 23 a viz genver. Lakeet zo bet eur gomision war-zao da aoza an oll oueliou a vo e 1983 da geñver 40 vloaz B.A.S.. Embannet e vo pladennoù ha leoniouigou, savet eun diskouezadeg, aozet goueliou e peb departamant da genta, hag en Oriant da houde, 'benn sul ar Pantekost. En deiz-se ivez ez ay an Transat kuit euz an Oriant. Ha n'eus ket ar riskl ne vez komzet en deiz-se nemed euz ar redadeg bagou, ha pas euz ar zonerez 'giz ar vro?

– 3 bloaz 'zo eo krog eun embanner euz ar Suis, **Slatkine**, da advoulla leoniou koz euz a Vreiz e stumm « reprint ». Kenlabourad a ra evid se gand ar **C.R.B.C. (Kreizenn an Enklaskou Breizeg ha Keltieg)** e Brest. Advoullet e-neus leoniou a dalvoudegez dièz da gaoud en deiz a hirio, evel re C. Vallaux, A. Dupouy, de Fréminville, A. ar Braz, Sauvé... War a zeblant, e-neus poan a-walh o werza al leoniou ken buan ha ma teuont er-mêz. Esperañs e-neus evelkent d'embann tri pe bevar all ar bloaz-mañ...

– Gand tost da 2000 a izili eo ar **Société Archéologique du Finistère** an hini greñva euz he seurt e Breiz. Beb bloaz eh embann eur Gannadig... ha n'he-deus ket kalz tra da weled gand ar hannadigou-parrez. Euz eur wir leor e e tleer komz e gwirionez, dre ma zo ennañ 450 pajenn. En niverenn CIX, a zo o paouez en em gaoud, e lenner meur a bennad diwar-benn ar brezoneg: euz ar galianeg d'ar brezoneg koz gand L. Fleuriot; niver ar vrezonegerien e Breiz-Izel er XVIIved kantved, gand F. Roudaut; ar parrezioù e Plou-, gand Bernard Tanguy; anoïou-leh ar Hab, gand R. Gargadenneg. F. Broudic, diouz e du, e-neus savet roll an oll skridou o tenna d'ar brezoneg pe d'al lennegezh vrezoneg a zo bet embannet euz 1979 da 1981: ouspenn 800 a referañsoù eo a zo 'barz ar roll-ze.

D.P.L.F. hag Emgleo Breiz e Diskouezadeg etrevroadel ar yezou

Kemeret e-neus perz Emgleo Breiz en Diskouezadeg etrevroadel anvet **Expo-Langues**, savet gand ar CIREEL (« Kreizenn Gelaoui hag Enklask evid Kelenn hag Implij ar Yezou ») ha bet digor, e-barz Palez-Meur Pariz, etre an 28 a viz genver ha devez kenta miz c'hwevrer.

Da heul kalz a gaoziou hag a zifreou, dreist-oll gand Bureo Diskouezadegou Kêr-Bariz, eo bet emglevet ar strolladoù oh ober D.P.L.F. (1): **Emgleo Breiz**, an **I.E.O.**, ha kevredigeziou all euz Bro-Oksitania (dindan paeronezh ar **Pen-Club Oksitaneg**), **Ikas** ha **Seaska** (Euskadi-an-Nord), **René-Schickelê-Kreis**, **Unvaniez ar Hevredigeziou katalaneg**. – evid feurmi eur stal pe stand 15 m². Ar peb brasa euz ar mizou-feurmi a oa bet kemeret war o hont gand or heneiled a Vro-Alzas hag int o voda eun daouzeg bennag a oberennoù o striva evid yez o bro. A-hend-all, lakeet e oa bet ivez **Diwan** 'barz an taol, gand asant Emgleo Breiz, – ha Diwan a zigasas d'e heul eun toullad stourmerien vreizeg a Bariz... Kalz re nebeud a blas, a-benn ar fin, evid an oll gostezennoù o tigas o leoniou hag o faperennoù!...

Tu a zo bet da gomz gand ar vizitourien evid sklêrjenna anezo e brezoneg, e galleg, pe... en esperanto, da rei dezo da houd kement a reer evid or Yez... Eun toullad paperennoù a veze roet o tispaka abegou ha pal or stourm, koulz evid oll yezou « minorezel » Bro-Hall hag evid ar brezoneg. Ar strolladoù all oh ober kemend-all evid yez o bro, evel just.

D'ar zul 30 a viz genver, ez eus bet tro, e-pad eun emvod urziet dre gouez da aket Herri GIORDAN da zivizoud da vad dirag eun tri hant

bennag a zelaouerien a-zivoud kudennou « yezou-rannvro » bro-Frañs, gand tud anavezet evel Robert LAFONT, Riccardo PETRELLA, Pascale MARCHETTI, eur stourmerez evid ar Yiddish, hag an Ao. RICARD (euz ministrerez ar Zevenadur) (2). Ha pa oa deut eno ivez an Ao. J.-C. LUC, ar hargad fiziet ennañ gand Alan Savary ober war-dro kudennou ar « yezou ha kulturou rannvro » e Ministrerez an Deskadurez, bet e-neus hennez da gleved meur a rebech stard diwar-benn an doare gwall-luziet ha ken skort ma lavar emaeer o seveni promesaou f'anch MITTERRAND hag an Tu-Kleiz... Hag evel ma heller kredi, ne oa ket an Ao. LUC en e vleud e-touez ar stourmerien a oa eno, ha n'eo ket deut a-benn da lakaad ar zelaouerien da stlaka an daouarn ouz divizou Savary...

Dleet eo menegi e oa evelato e stal Ministrerez Bro-Hall an Deskadurez eun daolenn vraz o tisklêria ar pez a heller... an nebeud a dra, ober e-barz ar skoliou evid kelenn Yezou minorezel ar Vro-C'hwehkogn, hag e oa diskouezet war eun daol eur rummad leoniou-studi evid or yezou, en o zouez leor-deski brezoneg Skol-Veur Vreiz-Izel. Damheñvel e stal ministrerez ar Zevenadur, gand diskouez oberennou lennegel (Gurvan Malemanche, Nomenoe Riou, Tremen Buhez Per-Jakez Helias, da skwer, evid Breiz) hag eur mell gartenn euz Yezou Frañs (eur fazienn enni gand ober eur yez keltieg euz ar galloeg).

Petra da zoñjal diwar-benn talvoudegez ar c'hweh devez-se gouestlet gand eur toullad stourmerien, - en eur mor a zaozneg, yez an darnvuia implijet en diskouezadeg, - evid rei da anaoud, endra m'hellent gand o galloud ken berr, pal o labour ha lakaad dirag o bizitourien eun darnig bihan euz o moulladurioù...

E-mesk deg ha deg stal vraz o tispaka kement a vez ijinet gand broiou gallouduz da rei ton ha brud d'o yez-stad, disterig, a-dra-zur, dilufr ha... didrouz ar hornig striz o-doa gelllet kaoud or heneiled evid o seiz yez... Amezeien binvidig a oa dezo gand Skol-Uhel Goethe, deuz eun tu, hag ar British Council, deuz eun tu all, ha pelloh, brasoh-brasa ha splanno-splanna an eil evid egile, staliou kinklet-cheuh Bro-Ganada, ar broiou arabeg, hag all...

N'eus forz, ne vo ket bet greet or striv en aner gand or mignoned! A-bouez eo bet evid or yezou beza roet d'anaoud evel-se an doare ma talher da glask mouga yezou ouspenn eun drederenn euz broiou ar C'hwehkorn. Petra bennag ma n'on-eus ket gelllet tapoud kaoud eno nemed eun daolig hag eun nebeud estajerennoù re striz, gouezet o-deus milierou a dremenidi, - en o zouez kalz kelennerien ha reou yaouank, ha tud estren, - ez eus e Bro-Hall eur gwall gudenn chomet

diziskoulm, dalhet kuzet gand Pariz endra ma hell. Kudenn yezou brudet-kaer koulskoude en istor Europa, gwarezet (sañset) gand reolennoù etrevroadel, nemed e chomer heb lakaad da dalvezoud evito gwirioù ar bobl a ra ganto!

Eun dra dalvouduz eo bet eta beza lakeet evel-se war-wel, e Kêr-Bariz, abegou ha doareou-labour DPLF, Emgleo Breiz, Schickelé-Kreis, IEO, Ikas, hag all... Eur vountadennig muioh da gas war-raog or stourm boutin evid ma vo gouezet kaoud d'or yezou al Lezenn-stur, ar Statut o senti ouz ar skridou sinet etre ar Stadou hag o rei tro da heuil doareou-ober ar broiou demokratel a-vremañ. Da lavared eo evid ma vo tizet kaoud ar peadra red, - reolennoù, yalhadoù ha tud stummet, - da lakaad mond endro da vad Kelenn or yezou, ha kement a ranker divizoud, ober ha gwaranti evid gouestla dezo al leh dleet e kement tachenn zo.

A.K.

(1) « **Défense et Promotion des Langues de France** », da lavared eo « **Divenn ha Kas-war-raog Yezou Bro-Hall** », ar hevredad oh erea kenetrezo ar strolladou braz euz ar seiz pobl euz Frañs perhennet ganto yezou diforñ euz ar galleg hag ar yezou oil, - hag int oh unani oberennou, kelhiou hag organadurioù o stourm evid sevenadurioù o fobloù: Breiz, Oksitania, Euskadi ha Katalonia-Nord, Korsika, Alzas ha Mozel, Flandrez Bro-Hall.

(2) H. GIORDAN, karget a gefridi gand J. LANG, ministr ar Zevenadur; - R. LAFONT, oberour anavezet mad-tre e-leiz a oberennou diwar-benn kudennou ar « Rannvroelez » ha skrivagner brudet oksitaneg; - R. PETRELLA, enklasker evid Kumunded Europa, oberour « Azginivelez ar Zevenadurioù-rannvro en Europa » (**La Renaissance des Cultures Régionales en Europe**, édit. «Entente»); - P. MARCHETTI, oberour leor-dorn deski ar horseg e ti Assimil.

Bugale Skol Blouhineg

Rouanez ar gorrigez

- gand eun droidigez en esperanto

10 lur (150g)

« Un chien dans un jeu de quilles »

Diwar goust ar gouerien hag ar vartoloded

N'eo ket a nevez 'zo e troer filmou da lakaad an dud da hoarzin diwar-goust tud all. Ar gouerien hag ar mitizien a zo bet greet aliez filmou diwar o houst evel-se. Hag ivez ar re n'emaint ket o chom e Pariz, hag a zo eta o veva hag o labourad e tu pe du deuz ar Frañs. Evid pezh a zell ar Vretoned, e-kerz ar bloaveziou tremenet, o-deus bet an « enor » hag ar « blijadur » o weled eur Seria bennag o tond da drei **Les Galettes de Pont-Aven** e Kerne, hag unan all – R. Dhéry, 'm-eus aon – o trei eñ **Vos gueules les mouettes**. Nag an eil nag egile n'int bet filmou dispar, med n'int ket bet dizoñjet.

Ar wech-mañ eo eur henvroad, Bernard Guillou, hag a ginnig deom e genta film dindan an titl **Un chien dans un jeu de quilles**. Deuet eo eñ ivez da drei anezañ e bro Pont-Aen, e Nevez, e Kloharz hag e koad Toull-Foenn. Sañset eo ivez eur film fentuz e-neus greet.

C'hoarzin a reer, gwir eo, o weled anezañ. Pe a vije c'hoant d'ober. An eurvad e-neus bet B. Guillou da helloud konta war c'hoarierien vrudet hag a oar mad o micher, Pierre Richard koulz ha Jean Carmet. Ne gaver ket hir e amzer o selled outo, rag d'o heul e c'hoarvez e-leiz a zarvoudou dihortoz, an eil lakeet war-lerh egile, evel ma tere en eur seurt film. Arabad, keta, lezel amzer d'an dud d'inoui.

Med ar film n'eo ket bepred euz ar finna toud, ha groz a-walh eo zoken a-wechou. N'ouzon ket e peleh eur bet oh ijina lakaad daou zen d'en em ganna en dour-teil, med evel-se ema: en em ganna a ra P. Richard gand unan all en dour-hañvouez! Eur film fentuz eo marteze, med diwar-goust

ar Vretoned eo e lak an arvestourien da fenti, ha diwar-goust ar gouerien hag ar vartoloded. Ar skeudenn a roer anezo oll er film n'eo ket gwall-avañtajuz evid hini ebed anezo.

Rag – evel just – eur vro gollet eo Breiz: an treñ Corail eo a gemer P. Richard e Pariz; en eur gêr vihan euz Breiz-Izel e tiskenn euz eur « micheline » dislivet. War ar blasenn dirag an ti-gar, zo kement a yeot ma ne weler ken ar panoñs hag a verk ez eus taxiou eno koulskoude. Ha tra-walh eo e tiskouezfe eur plah yaouank pennou he daoulin evid ma'h afe kerkent eun eil taxi a-benn gand an hini kenta... N'eus ket c'hoaz a bonchou da dreuzi ar stêr, hag ar vag a ranker kemer, gwetur hag all, a-benn en em gaoud... en eur prad!

Debrerien amann eo ivez ar Vretoned-ze, anad eo. Ha lonkerien. Kerkent hag an daolenn genta euz ar film, e weler Jean Carmet o trinka gand e berhenn hag oh eva lambig. Meur a wech, goude-ze, e vo lakeet hini pe hini da eva tra pe dra. Nemed gwir euz eo ah ev ar Breizad (J. Carmet), pa n'ev e vreur parizian (P. Richard) nemed lêz. O amzer a dremen ivez ar vartoloded koulz hag ar gouerien en ostaleri: pa vez ezomm diouto ' dalv ket ar boan mond da glask anezo da leh all! Med en ostaleri, n'ouzon ket en em zerhel. An nebeuta reont c'hoaz eo en em ganna, diwar eur banne a re. Med ... staotad diwar eun daol e diabarz an ostaleri a reont ivez!

Gand se, n'eo ket souezuz n'o-dije morse gwelet eur vaouez e noaz. Tarluchad a ra Jean Carmet, me lar deoh, pa wel, a-dreuz eul liñsel, eur Barizianez o cheñch he dillad. Selled dre doull an nor a vank d'ar vartoloded ober, se zo sklêr, p'ema P. Richard o strinka dour da walhi e wreg hag a oa kouezet er porz, el lehid. Selled gand gevell-lunedou a ra paotred yaouank ar hastell da weled anezi a dro-kein. Dispourbellet eo o daoulagad d'ar gouerien, a zo en em guzet er zolier, p'emaer o tenna plomm euz feskenno eun dimezell bennag...

N'eo ket toud. Evel 50 vloaz 'zo (d'an nebeuta!) e talh ar beizanted da labourad war zigarez ekolojiez. En eun ti-soul ema bepred J. Carmet o loja. Ha gweled a reer anezañ o vond da gousked memez en eur gwele kloz. N'e-neus ket an telefon er gêr: perag, emezañ, n'e-nije ket eur frigo ivez neuze! Hag gand eur harr sterniet eo eh a bepred d'ar bourk...

Ken paour-kêz tud eo ar beizanted-ze ken e rankont gervel Parizianed da zikour anezo. P. Richard n'eus ket anezañ eur Parizian a bell 'zo. Med abaoe 17 vloaz m'e-neus kuiteet e gêriadenn henidig, e vreur, e gamaraded hag e... gamaradedezed, e-neus bet amzer d'ober berz e Pariz, da zastum arhant en eur ober eur vicher e psy..., da zimezi gand eur wreg

koant, hag eo prest evel-se da zond d'ober e baotr digourdi ha da rei kenteliou d'e vreur ha d'an oll war ar feson gwella d'en em gemer. « Il n'est bon bec... » a vez lavaret...

Tud a-ziwar-lerh a reer euz ar Vretoned, euz ar beizanted hag euz ar vartoloded eta, e-barz « Un chien dans un jeu de quilles », N'eo ket bet cheñchet kennebeud an daremprejou etre ar rummadou-tud: eur perhenn e-neus ar penn-tiegezh ha menajer J. Carmet, lizer gantañ, a zo o veva en eur hastell. Istor ar film eo just a-walh e-neus c'hoant aotrou ar hastell da vounta egile er-mêz, ha da dorri dezañ e lizer. Deski a raim eo evid ma werzje an douar da ziskarga teil-kêr, pe teil-pavez, warno. Dre-veza emgann Plogoñ a reer amañ en eun doare sklêr: gervel a reer an oll amezeien da zond da ziwall an tiegezh en noz, ha dond a ra ar CRSe da lakaad anezo da zenti ouz an urz... Sed a blijjo sur mad da dud ar Hab!

Klichedou, klichedou toud ha klichedou, nemetken. Souezuz e helljed ober c'hoaz filmou seurt-se hag a zo c'hwez ar hoz hag an dibaseet ganto. Filmou da hoarzin ne reont ket a zroug, pa vezont greet mad. Med hemañ, se zo sur, ne ro ket eur skeudenn gwall-gaer euz ar Vretoned na deuz o bro.

F.B.

R. GERALLT JONES

CAFFLOGION

bet lakeet e brezoneg gand

J. ABASQ

Eul leor skiant-faltazi!

Priz kenta an Eisteddfod, 1979

10 lur (150g)

